


# hop yezh



# GWERLIN

embannet gant "Al Liamm"  
Mv.:





DASTUMADENN A WERINONIEZH

RENET GANT ABEOZEN

NIVERENN GENTAN

KANAOUENNOU DASTUMET GANT G. MILIN - Levrenn 1 -  
niverennet eus 1 da 46

Testenn diskrivet gant ABEOZEN

H O R Y E Z H

1 9 6 1

Tennet ez eus bet eus an  
niverenn-mañ

150 skouerenn

Pep gwir miret strizh e pep  
keñver gant Abeozen ha Maodez  
Glanndour vvvv

TAOLENNADUR AN DORNSKRID

Dornskrid Milin implijet ganimp evit an niverenn-mañ  
eus Gwerin a reomp MVOL 58 anezhañ.  
Bet eo tra Milin, Vallée, J. Ollivier ha bremañ an dok-  
tor-jeneral C. Laurent, ha 58 pajenn a zo ennañ.

Paper tev, arvelen, gant siell sec'h Merdeadurezh ar  
Roue.

An niverennoù a lakomp amañ etre krochedoù eo ar re a  
roomp d'ar c'hanaouennoù en hor mouladur.

M V O L 5 8

- (1) Pajenn 1-3 (krec'h): Maro Markiz Gwerrand  
( 2 vann : an droidigezh c'hallek diechu )
- (2) P.3-6 (kreiz): Gwers Radegond Pennerez Roc'han  
( hep troidigezh ) ( lañ bann )
- (3) P.3 ( eil bann ) : Kloarek Lambol pe Markiz Gwerrand  
( brezhoneg hepken )
- (4) P.4 (eil bann): Soun ar gwin (brez hepken )
- (5) P.5 (eil + trede bann) : Iann Es-Kolwen hag he baeron  
( brezhoneg hepken )
- (6) P.6 ( lañ bann ) - 8 ( lañ bann ) : Markiz Gwerrand -  
Al leur neve , iez Treger ( brezhoneg hepken )
- (7) P.6 ( eil bann ) : Soun ann tortik ( brezh. hepken )
- (8) P.8 ( lañ bann ) : Loiza ~~NAG/ABALATA~~ (brezh.hepken)
- (9) P.8 ( eil bann )-9 ( trede bann ) : (An daou zen yaouank)  
" Selaout eur complaisans " ( brezh. hepken )
- (10) P.9 (lañ bann) - 10 (lañ bann): Kelennadur ar roue  
sant Salomon ( brezh. hepken )
- (11) P.9 (eil bann): "Iann a zo est da Pompiller" (n'eus  
mai a droidigezh )
- (12) P.10-11 ( lañ bann ) : "An aotrou Tregonk..." (doare  
eus an Aotrou Nann )
- (13) P.10-11-12 ( eil bann ) : "Ar c'hountes holl..."  
( doare all eus an Aotrou Nann )
- (14) P.12-13 (lañ bann) : Ar plac'hig seiz vloaz
- (15) P.13 (lañ bann) : Ann Durgunel

- (16) P.13 (lañ bann) : Ar Bugel Pemp bloaz  
(17) P.13 (eil bann) : "Eul lurvez goude koan..."  
(18) P.13 (eil bann) : "Me meuz bet eur vestrezik..."  
(19) P.13 (eil bann) : "Deut ganen va mestrez..."  
(20) P.14 (lañ bann) : "Lekomp pep a gornad butun..."  
(21) P.14 (eil bann) : "Ha p'em me kant skoed..."  
(22) P.15-16 : Va map Silvestik  
(23) P.16 (lañ hag eil bann) - 17 (2 vann) : Helierolland  
( M. Jeanne Perrot )  
(24) P.18 ( 2 vann ) : Ann Anaoun  
(25) P.18 (eil bann traoñ) : Ann Hini Goz (6 poz hag an diskant)  
(26) P.19 ( daou vann ) : Penherez Keroulaz  
(27) P.20 (lañ bann + eil bann krec'h) : Ann Aotrou Gludonou  
(28) P.20 (eil bann traoñ) : "Nag ann Diaoul..." ( Ur gwaller )  
(29) P.21 ( 2 vann ) : ( Ar Breur hag ar C'hoar )  
(30) P.21 (eil bann kreiz) - 22 ( 2 vann ) : Ar Morvan Koz  
(31) P.23 ( 2 vann ) : Sant Julian  
(32) P.23 (eil bann kreiz) - 24 - 25 ( 2 vann ) - 26 ( lañ bann krec'h ) : Laeroun Plufur  
(33) P.26 (lañ bann kreiz + eil bann) : Karann ar Briz  
(34) P. 27 (lañ bann) : Ar C'hakouz  
(35) P.27 (lañ bann + eil bann) : Kloarek Rosko

P.28 ( 2 vann ) : "Les adieux du conscrit breton partant pour l'armée". 14 poz eus gwerz P. Proux. Mankout a ra ar pozioù 11 ha 13. Kemmoù dister er skrid.

P.28 ( Adal amañ e kaver war led ar bajenn bommoù gallek kemeret e E. Souvestre, Les Derniers Bretons, mouladur 1836 )

P.28 ( eil bann traoñ ) - 29 ( krec'h ar bajenn ) : "Complainte du laboureur"

P.29 (kreiz) - 30 : "Analyse du ch. 1 relatif au Léon"

P.30 (kreiz) - 31 (krec'h) : "Le drap mortuaire" ( édition 1836, t.1, p. 62 )

P.31 (kreiz) : "Chanson du Marié" ( Derniers Bretons, 1, 55-56 )

P.31 (traoñ) : "Chanson de la Mariée" (Dern. Bret. 1, 56-57 )

P.32 (krec'h) : "Hommage à Dieu dans la solitude" ( Dern. Bret. 1836, Tome II, p.196-199 )  
P.32 (kreiz) : "Le petit pauvre" ( Dern. bret. 1, p. 196-197 )  
P.32 (traoñ) : "Sone" (Dern. Bret. 1, p. 197-198 )  
P.33 : "Trois autres sones" Tréguier ( Dern. Bret. 1, p. 198-199 ; 201-202 ; 203 )  
P.34 : "Le pillouer"(traduc.) ( Dern. Bret. II, p. 180-181 )  
( An notennoù a zegasomp amañ diwar-benn ar p.28-34 a zo ar re lakaet gant J. Ollivier ouzh brouilhed an eilskrid en deus savet eus dastumad Milin ha roet gantañ, hervez ar Mezeg-Jeneral C. Laurent, da Levraoueg Roazhon )

- (36) P.35 (lañ bann, eil ha trede) : Guerz Santez Enori  
(37) P.35 (trede bann) : Kure Lokirek  
(38) P.36 (lañ bann hag eil) : ( Mac'haid Charlez )  
(39) P.36 (trede bann) : Moriset Iann Skolan  
(40) P.36 (eil bann kreiz) : "Lazit ho pried, me rai va hini"  
(41) P.37 (lañ Bann) : ( Ar C'hloarek hag e vreur labourer )  
(42) P.37 (eil ha trede bann) : Persoun Leskoat ha Jeanne ar Gallik  
(43) P.37 (trede bann traoñ) ha 38 (lañ bann) : Ar Paour  
P.38 (eil bann) : Biroun ha Destin ( Ar ganaouenn-mañ a vo diskrivez da heul un dornskrid all, MVOL 14 folleñ )  
(44) P.38 (trede bann) : Ar seis Manac'h  
(45) P.39 (lañ bann + eil bann krec'h) : Ar Paour Keaz  
(46) P.39 (bann eil ha trede) : "Complainte sur la mort violente du P. Guillaume Lecourt, gardien des Cordeliers du monastère de N.D. de Grâces, près Guingamp"  
P.40-41 ( brezh. ha galleg keñver ha keñver )  
P.42-43 ( krec'h ) ( brezh. hepken ) : Koantik Holl  
Diwar ar werzenn-mañ (poz 14, trede gwerzenn) : Gra evel ann eostig, gra, paour keaz barz Koad-ann-Notz, e o'heller dastum ez eo un oberenn gant Y.V. ar Yann ( Eostig Koad an Noz ).

P.43-54 : CANTICOU ( tennet eus Dornskrid Botmeur )

" Tiré d'un manuscrit breton appartenant à la bibliothèque de la Marine, manuscrit copié, dit la préface ( je suppose par Mr du Botmeur à son chateau entre Bras-pars et Morlaix ) sur un livre composé par le P. Julien Maunoir, jésuite, successeur de Michel le Nobletz. ( Je ne changerai rien à l'orthographe de ce manuscrit ) "

P.43 (2 vann) + 44 (lañ bann) : Cantig ouar buhez ar Seiz Sant

P.44 (krec'h) : "Expressions et tourmures tirées de la Vie de Ste Nonne ( Buez santez Nonn ) "

P.44 (eil bann) + 45 (2 vann) + 46 (2 vann) : Cantig ouar buhez sant Guillerm patron ann Holl penitantet. 240 gw. 8 sil. e pozioù 4 gw.

P.46 (trede bann) + 47 (tri bann) : Cantig ouar buhez Santes Barba pehini a zo eur santes a beder oc'h ar maro sublt. m. e. m. g. daboishardy, boelec en devesus hy composé. 248 gw. 8 sil. e pozioù 4 gw.

P.47 (trede bann traoñ) + 48-49 (2vann) : Cantig ouar buhez Santes Bodet guinidig a escopti Leon. 256 gw. 12 sil. e pozioù 4 gw. ( Emb. gant L. Dujardin, Gwalarn, niv. 134, meurzh 1941. - E niv. 131, Kerzu 1940, p. 61-65, e komz diwar-benn Dornskrid Levraoueg ar Verdeadurezh : Eun dornskrid koz. )

P.49 (eil bann traoñ) + 50 (tri bann) : Cantig ouar buhez sant Julian. 240 gw. 8 sil. pozioù 4 gw.

P.50 (eil bann traoñ ha trede bann) + 51 (tri bann) : Cantig ouar buhez Santes Genof-feua. 458 gw. 8 sil.

P.52-53 (2 vann) + 51 (lañ bann) : Cantig ouar ar garantez admirabl a ziscuezas Sant Caourintin en andret un den iac'han, pe hini a oue chaset gant e dad hac e van a enep guir ha raison. 368 gw. 13 sil. ("L.Lok a laka anv an Tad Maner war ar c'hantik-mañ : diaes eo krediñ en divije eñ savet ur seurt randonezh, ken gwan ennañ ar spered relijiel )

P.54 (eil bann) + 55 (tri bann) : Darvez un dornskrid a anvomp T. 40 ( Kaierig 40 pajenn, 20 anezho skrivet, gant Tanguy François, 1859 ) gwisket dezhañ gant Milin e zoare-skrivañ :

1. "Daou grenn-lavar" ( 2 werzenn ha 4 gwerzenn )
2. Rosen Plouescat ( 4 foz 4 gw. 8 sil )

3. Folgoet ( 12 poz 4 gw. 13 sil. )
4. Gwerz sant Tenenan ( 51 poz 4 gw. 8 sil. )  
( 6 poz dibenn T.40 a vank amañ )

P. 56-57-58 a zo eilpennet. Milin a verk gant se ne ra ket kalz a stad eus an darvez-mañ e-keñver ar peurrest. N'en deus ket diverket avat an div rimsdell :

- P. 58-57-56 (krec'h) : Ganedigez mab hon impalaer  
P. 56 ( war 2 vann ) : Soudard Kastel Paol

oooooooooooo

BERRADURIOU HA SINOÙ-DISKRIVAN

En tu-hont d'ar berradurioù boaz a vo komprenet hep  
liaesamant, sed amañ ar sinoù hon eus graet ganto da  
ziskrivañ hon dornskridoù :

- /.../ = ger pe c'herioù bet barrennet en destenn
- ° = goude ur ger, ar sin-mañ a gas d'un notenn er marz pe e traoñ ar bajenn. An displegadur avat pe an notenn er marz pe e traoñ ar bajenn a zo an hevelep sin dirazo.
- °° = idem, evit un eil ger notennet war an hevelep linenn.
- W- = dindan ger pe gerioù an destenn e lenner ur ger pe gerioù all.
- X = dindan ger pe gerioù an destenn ez eus bet skrivet da gentañ ur ger pe gerioù all a chom dilennus.
- ?... = ger pe gerioù eus an destenn n'heller ket lenn anezho.
- (...) = en destenn, lennadur diasur. en diavaez eus an destenn, notenn a-berzh an embannour.
- = ger pe gerioù a vank ( en un eilstumm )
- + = ger pe gerioù bet skrivet goude ar bomm kentañ, pe degaset en tu-hont en un eilstumm.
- a-us: = skrivet a-us d'al linenn.
- a-is = skrivet a-is (dindan) al linenn.
- M: = skrivet e marz an dornskrid.
- / = war ul lizherenn pe lizherennoù, ur varrenn a verk ez int bet diverket en dornskrid.

ooooooo

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

1. MARC MARKIZ GWERRAND

( E korn dehoù ar bajenn gentañ : )  
Journée du 24 février  
1856

- Mar plich ganehoc'h e selaoufed eur verz nevez zo komposet (bis) da varkiz gwerrand /hi a zo/° gret
  - Ann aotrou markiz zo e gwerrand zo balamour de zestamant hag ar varkizez e gwengamp.
  - Ann aotrou Markiz zo choumet klan /birviken/°he galen joa ne ra.
  - Ar varkizez oa oc'h ebati Tud gentil vraz a oa ganthi
  - .....
  - N'oa ket 'l lizer digoret mad n'oa ann douar war he daoulagad
  - N'oa ket 'l lizer hanter lennet na oa ar paper holl /distrempet/°
  - Ar varkizez a lavare d'he fotr a goch eno neuze: /Stagit/° pevar marc'h oc'h va c'harroz
  - me rank mont da Werrand femnoz.
  - ar varkizez a c'houlenne deuz° ar beorien pa dremene :
  - Peorien ° d'in me leveret
  - ° velét ar markiz° ha c'houl zo bet
  - Introun, hon /exkuzi a/ red
  - ° n'omp ket bet ouz ho velet.
  - Kriz vije 'r galoun na lennje en gwerrand ann hini vije klevet /ann/° aotrou hag ann introun hag int ho daou ° c'houl pardoun
  - Pardoun, emezhi, va fried, Abalamour m'am euz ho kuitet
  - Me eo, 'mezhan dle goulañ pardoun pam euz roet abek d'ec'h, Introun. ma fried paour, na vec'h ° kountant me /rafe/ breman va zestamant
  - grit ann destamant a gerfed, evel a lerfed a vo gret. Kenta testamant a eure /offr/°he hene da Zone
  - he gorf d'ann douar benniget pe d'ann iliz pe d'ar vered. Kant skoet a roinn en Plegat
- ° a-us: ez eo
  - ° a-us : biken
  - ° a-us: glepiet
  - ° a-us: Sternit
  - ° a-us : oc'h
  - ° a-us : geiz
  - ° a-us:/ann aotrou/
  - ° a-us: digarezi
  - ° a-us: + ni
  - ° a-us: 'n
  - ° a-us : + hu
  - ° a-us : rae
  - ° a-us : kinnig

e ti an aotrou sant Egat  
 Kant skoet a roinn e Plougonven  
 E ti an aotrou fant<sup>o</sup> Euzen. ° a-us : s  
 Daou c'hant ° a roinn e Lujvidi ° a-us : skoet  
 balamour m'oun fondator ennh<sup>o</sup>. ° a-is : meuz savet  
 Kant skoet a roinn da ger 'n Introuñ  
 houn-nez a garann em c'haloun  
 hanter kant ebarz e Lanmeur  
 da Zant Veler dindan ar c'hoeur  
 Kant skoet a roinn ° e Tredrez ° a-us : c'hoaz  
 /kemend/° all e Loumikeal /ann/°° trez °:kant °°: 'nn  
 eun hograou nevez Á roinn da Blestiniz  
 hag eunn all e sant iann ar biz  
 /ma vo dekor ennh<sup>o</sup> o viz/.  
 Ar varkizez a lavaraz  
 d'an aotrou Markiz pa her c'hlevaz:  
 - me /zo dibourvez/° va fried, ° a-is: ne hellin biken  
 /da/ ober ar pez a leveret ° a-us : 'ta  
 -Dala/° alc'houe va c'habinet ° a-us: en em estlamaz  
 seiz vloa zo ne ket digoret.  
 Ann introuñ/a estonaz/°  
 he c'habinet pa zigoraz,  
 'welet ann aour hag ann arc'hant  
 zo barz er c'hastel a Werrand.  
 - Kaloun, emezhi, va fried  
 evel a lorfed a vo gret ° a-is : mevellien  
 Pemzek /domistik/°zo em zi  
 pep a habit zu d'he a roi.  
 pep a habit /zu/ da zougenn kaon  
 m'ho /devezo/° koun euz ann anaon. ° a-is: dezo  
 Etre Mountroulez ha Gwerrand  
 me meuz eur varkizez ha kant  
 Etre Gwerrand ha pomeno  
 e meuz kemend all pe war dro.  
 /pep a dregont skoet/° leve roin d'ezhe °a-us:Á gant skoet  
 hag he pe c'hoaz muioe'h evithe.  
 - Ma fried paour, ma em zentet ° a-us: 'n  
 eun° hospital nevez vo savet  
 vo ennan daouzek a beorien  
 Adalek breman da virviken  
 eur belek mad d'ho /instrui/ ° a-us: c'helen-hi  
 ne vanko man dezho /enn/° ho zi. ° a-us : 'n

( Maro Markiz Gwerrand a zo bet embannet gant Milin e  
 Bulletin de la Société Académique de Brest, IV, 1865, p.  
 105-110

Dornskridoù Milin: Kanaouennoù

2. GWERS RADEGOND PENNEREZ ROHAN

Eur bennerez euz a Roc'han  
 ha ne oa nemed hi he unan  
 Pennerez oa pa na doa ken  
 heritourez de holl moien  
 Tud chentil hi daremprede  
 Tud a galite d'ar Roue  
 ha ne blije hini d'ezhi  
 nemed hennont markiz Agni.  
 Tri miz hanter eo bet padet  
 ar zolennite° euz ann eured, ° a-us : lidou  
 ar zommerien, ar bal, ann dans,  
 Bizitou bemdez gant noblans.  
 Kement man ne badaz ket pell  
 na dar Roue e teuz brezel.  
 Agni a oa ann huella  
 a dlle bale da genta.  
 Radegond doa eunn orator  
 er jardin war bord ar mor  
 /hag/ a bede Doue ° bepred ° a-us : eno  
 ma c'hounesje enn arme he fried.  
 Eunn dez edo e peden  
 eunn eal euz ann env a ziskan  
 Oc'h Radegond en deuz komzet  
 na dezi en deuz lavaret : peden  
 - Radegond /na bedit ket/  
 Ho pried Agni /a zo marvet/. ° a-us : chenchit ho  
 E tan ar Purgator eman, ° a-us: ne vev ken  
 Pedit Doue maz ai anezhan.  
 Daou enebour en em gavjont  
 hag ho daou en em venvjont.  
 Radegond p'he deuz her c'hlevet ° a-us: deuet  
 Raktal dar gear a zo /distrout/  
 Da gimiada dioc'h he mamm gaer he zad  
 abalamour da respet ho map.  
 Tri bloaz hanter he deuz douget  
 kaon dezhan gant gwir respet,  
 kaon dezhan gant modesti,  
 skuilla daelou, huanadi.  
 Tud chentil hi daremprede  
 Tud a galite d'ar Roue  
 ha ne blije hini dezhi  
 nemed henn hount markiz Agni

nemed hen houn Markiz De Gange°,  
 eunn den doujet enn he gontre.  
 ennhez en deuz he goulenet  
 Hag her reuzi° he gredaz ket.  
 Tri miz hanter eo bet padet  
 ar zolennite euz an eured,  
 ar zonnerien, ar bal, an dans  
 zo bet bemdez gant an noblans.  
 Kemend-man ne badaz ket pell :  
 digeri a reaz ar brezel  
 Ne voa ket bet pell enn arme  
 ma oe skrivet enn he bete  
 da zont dar gear ha dizamant  
 da ober diou vadisiant.  
 e penn he borz pa oe erruet  
 holl dud e di en deuz saludet  
 hag eur joa vraz enn he galoun  
 o c'houlou penaoz oa he introun.  
 er gear ne hellaz ked choum pell  
 distrei a rankaz d'ar brezel.  
 Ken(t) sortial er meaz he di  
 e roaz d'he vreur ar zourci  
 deuz he vadou ha tud he di,  
 euz Radegond dreist pep hini.  
 Ne voa ket bet pell enn arme  
 ma oe skrivet eul lizer neve  
 e rea he bried nosvesiou gwen  
 gant darn euz he zervicherien.  
 e penn he borz pa z eo arruet  
 holl dud he di 'n deuz ° saludet  
 hag hen nen deuz ket respontet.  
 nag anezho great van ebet.  
 ann introun p'e devez klevet  
 oa he demezel gourdroutet  
 a skriv gant he goad eul lizer  
 evit kas buhan d'he mamm gaer  
 da zont dar gear da vaner Timad  
 /diret/° oc'h buanegez he map  
 - Petra zo did-te lavaret  
 ma zout er giz-se koleret ?  
 - Ha n'eo ket me eo ann hini  
 a dle lakat urz vat en zi ?  
 Ann introun pe devez klevet  
 oa ar vamm gaer gourdroutet  
 a leaz neuze da di 'r vagerez  
 da boket d'ann daou vogel kez :  
 - Kent ann deiz c'houl vo minoret  
 aberz ho mamm baour glac'haret

- ° Lenn: Deganje, ha  
kompreñ : Du Gange
- ° Komp.: refuzi

° a-us : her

° a-us: da viret

( Gwers Radegond Pennerez Rohan )

hi d'ar gear /a zo/ distroet ° a-us : ez eo  
 e kramp ann demezel eo pignet.  
 Ann sotrou a zo eat d'an neac'h  
 eur gountel lansen war he vreao'h.  
 hi a gomz outhan : - va fried,  
 Petra zo did te lavaret ?  
 petra dit-te am euz me gret  
 maz oud kement se koleret ?  
 Seis taol war n hugent a roaz dezhi  
 ha Radegond ne gomz ket mui  
 ar verc'hez a barlant°evit hi ° a-us : ra  
 - Kaloun ha ne(r)z va merc'h, 'mezhi  
 great eo da blaz azirak Doue.  
 Ann douarerez koz a lavare  
 anntronoz vintin pa zave :  
 - Deomp ac'haleñ enn hano'n dreinded  
 da c'hout pe seurt nosvez a zo bet  
 - Va mabik paour, mar Aemaoud aze  
 respount buhan ac'hanoñ me.  
 Petra zo did-te lavaret  
 ma c'heuz da Radegond lazet ?  
 - Va Radegond amez lazet  
 o kredi ann teodou milliget.  
 he breur kaer a ia da c'houl pardoun  
 oc'h he c'hoar gaer ann Introun.  
 eunn dalm gurun a zo deuet  
 hag an tirant a zo devet  
 ha bruzunet he holl vemprou  
 o tont d'ann traon gant ann deresicu.



3. KLOAREK LAMBOL pe MARKIZ GWERRAND

Kloarek Lambol a vonjoure  
e ti 'r C'halve koz pa errue:  
- Na bonjour ha joa en ti man  
Fiekra Galve pe leac'h eman ?  
- Nag ema duze er gampr venn  
nag o tiluia he bleo melen.  
Kloarek Lambol pen deuz klevet  
gant an diri e/ bet pignet.  
- Bonjour dehoc'h Fiekra Galve  
ha c'houi deufe dal leur neve ?  
- Na d'al leur neve ne dinn ket  
gant ar markiz wenn° gourdrouzet.  
- Gourdrouz ar markiz peza garo  
na dal leur neve ni a ielo.

° Kompren: ven

-----  
Na markiz guerrand a c'houlenne  
digant ann hostizez eno neuze !  
- hostizez, din me leveret  
hag ar c'hloarek hoc'h euz gwelet.  
- Ia, aotrou, tremenet eo dre aze  
Fiekra Galve oc'h he goste.  
Ann aotrou markiz pen deuz klevet  
eunn taol kentr d'he varc'h en deuz roet,  
eunn taol kentr d'he varc'h en deuz roet  
ha dal leur neve ez eo eet.  
- Tud al leur neve, din leveret  
hag ar c'hloarek hoc'h euz gwelet  
- Ema e traon al leur o tansal  
ha ganthan ann hini a gar.  
Ann aotrou markiz pen deuz klevet  
eunn taol kentr d'he varc'h en deuz roet,  
eunn taol kentr d'he varc'h en deuz roet  
hag e traon al leur ez eo eet.

-----  
- Kloarek, demp hon daou war ar gajou  
daou vaout zo ha tri re vanegou  
ha ma c'hounez te anezho  
araok neuze c'hoari vezo.  
- Aotrou, o'houi zo digentil a Verrand  
ha me zo map eur paisant.  
- Te oar dibab ar merc'hed koant.  
Memeuz eur c'hleve hirr ha moan,  
Kloarek, a droc'ho did da ruban.

- Aotrou, memeuz eur vazik a zaou benn  
 a zo he c'hreiz d'ho kourc'henn.  
 ann aotrou Markiz pen deuz klevet  
 enn eur sut arc'hant en deuz o'houezet,  
 enn eur sut arc'hant en deuz c'houezet  
 triouac'h digentil zo en em gavet.

Kriz ar galon ma na ouelje  
 nag el leur neve neb a vije  
 o welet al leur o ruia  
 gant goad ar c'hloarek o skuilla.  
 Fiekra Galve pe deuz gwelet  
 e bleo ar markiz eo bet lammet  
 e bleo ar markiz eo bet lammet  
 teir zro dal leur ganthan deuz gret.  
 - Evidoud da veza lazet ar c'hloarek  
 ne vi ket well euz va gwerc'hded.

Fiekra Galve a lavare  
 nag er gear d'he mamm pa errue:  
 - Va mamm, grit va gwele buan  
 birviken anezhan ne zavan,  
 birviken anezhan ne zavan  
 pazeo maro an hini a garann.

( Kloarek Lambaul a zo bet embannet gant Milin e Bulletin  
 de la Société Académique de Brest, tome 4, 1864-65, p. 98-  
 104 )

Dornskridoù Milin : Karacuennoù

4. SOUN AR GWIN

Bon! bon! ar gwin zo mad  
 digasit d'omp ni boutaillad.

eur coataer, eur paezand glez  
 /ar gwin pen em gevez/  
 ha kement den zo war ar mez  
 /da holl laouenidigez/  
 a zo ar gwin ho levenez.  
 E nep leac'h ne reont eur marc'had  
 na vez dirak ho daoulagad  
 gwin evit kenta arrez.  
 Efet ar gwin gant Per ha Pol  
 e tarc'hoont ho daou war an dol, bon, bon !

Eur paour kez, eur piler lan  
 anavezet evit dogan  
 mar deuz gwin em e borban  
 zo mignoun braz d'he amezek  
 pardoni holl a ra d'he c'hrek  
 mar en deuz gwin ez e kontan  
 kontant da zougen kernel  
 ha da gana betennavel, bon, bon !

Mar komzan euz al leanezed  
 em euz kalz traou da lavaret  
 tanoa /ar/ gwin ° a efont ° a-us : zo  
 kafe, chokola, traou lipouz  
 a gemeront heb ober trouz  
 emerken banne flour a lonkont ° a-is: ann traon  
 /ha/ pa deu ° da ratifia  
 e komansont holl da gana : ° a-us: peb a  
 bon, bon ! an dra man zo mad  
 ma hor befe c'hoaz /eul/° lipad

Ar pabed, ar gardinaled  
 ar rouanez hag ar brinsed  
 a lez an dour a gostez ° a-us: desho 'met  
 ne zervich /nemet/° da walc'hi ° a-us: ho  
 ho min hag ivez penn /ar/° fri.  
 pa vez outhan morlarjez ° a-us: ho o'halon  
 neuze 'kanont A greiz kalon°  
 ne oufac'h ket war be seurt ton,  
 bon, bon !

Dan dud chentil ez eo ebad  
efa gwin hag ober chervad  
Leve ho deuz hag arc'hant gwenn  
dezho ne hell markout nep tra  
hervez ho goad ho deuz pep tra  
Lakaat rinsa ar veren  
rinset kempen ha leun a vin  
e tistro buan deoc'h ho min  
ker buan hag eul luc'heden  
neuze e kanont a greiz laloun  
ha n'oufac'h ket war beseurt ton,  
bon, bon

Gwelet a riz war an divreac'h  
en deiz all dougen daou vanac'h  
ho daou a urz sant Martin  
ho daou ez oant ken horel  
n'hellent mui en em zerc'hel  
hag o ruilla ho zac'had gwin  
kel leun a oa ho feultrin  
/neuze/ e kanont a greiz ho c'halon  
ne oufac'h ket war be seurt ton,  
bon, bon

em eur gatredal en deiz all  
eur chaloni mezo mik dall  
deut he dro da gana 'n antien  
sao en he zav da rei an ton  
digor he c'henou evel eur forn  
a denfe anezhi eur c'hoanen  
heman ne zanje e nep tra  
nemed er pezh a zea da gana  
/ a griaz a bouez he benn/ :  
bon, bon

boutou prenerien sant fransez  
a lonk ar gwin evel al lez  
er c'houent c'hon diarc'hen.  
studia tam ne bermettont  
habil awalc'h int /mar keront/  
mar deo ar gwer a zoare.  
pho deuz efet evel toullou  
e kanont holl evit grasou  
bon, bon !

Setu echu brema ar zon  
roit din eur banne braz ha don

( Soun ar gwin )

roit, roit ha roit eleiz  
/ha me gano beteg ann deiz/  
bon, bon!

dizec'h holl eo va c'hornaillen  
na roit ket din eur banne  
eur banne braz  
dizec'h holl eo va c'hornaillen  
diskargit 'ta leiz va gweren  
diskargit din hed an deiz  
ha me gano gwalc'h va c'halon,  
me gano dehoc'h laouen va zon

o a-us: war ho  
c'hont

Dornskridoù Milin: Kanaouennoù

5. IANN ES-KOLWENN HAG HE BAERON

( E korn ar folleñn : )  
1856 Larz - gardien  
des subsistances

Iann Es-Kolwenn hag he baeroun  
a zo deut da c'houlen pardoun,  
a zo deut da c'houlen pardoun,  
ha de bec'hejou remission.

En ti oa noz paz int antreet  
ha noz-vad en deuz lavaret :  
- noz vad da holl dud an ti-man  
hag eet int da gousket enghan ?

eet eo aman 'n holl da gousket,  
nemet oun me a zo chommet  
a zo choumet me va unan  
da laza 'r goulou da baka 'n tan.

O itroun Varia an dreinded  
piou ar re man a zo deuet  
mem boa alc'houezet va dorjoui  
ha prennet mad va bolejou.

- Ho grek, ho grek! na spountit ket  
ouz ho map es-kolwenn e komzet,  
/zo deut ama gant he baeroun,  
deut gant va faeron dho kwelet  
da c'houlen 'nn dra zo din red.

- Mar deo va map ez eo hemen  
m'em boa he lianet e gwenn  
hag eo deut e du dam gwelet  
evit doare ez eo poaniet.

euz tan ar plukator e teuan  
da dan 'nn ifern eo ez ann  
da dan ann ifern da zevi  
ma na garit va fardoni

penaoz e vez te pardonet  
re ec'h euz Doue offanset  
braz ec'h euz Doue offanset  
Leorik da dad ac'h euz kollet.

- Leorik va zad ne de ket kollet  
er mor ema triouac'h goured,  
er mor ema triouac'h goured  
gant eur peskik bihan o viret

'Met teir feillen ne deuz louzet  
el leorik va zad ma leret :  
unan dre c'hoad, eun all dre dan  
eun all gant va daelou va unan

euz an dan ar plukator e teuan  
da dan ann ifern eo ez ann,  
da dan ann ifern da zevi  
ma na gerit va fardoni.

- Penaoz e vez te pardounet  
re ec'h euz Doue offanset,  
re ec'h euz Doue offanset  
da beder c'hoar ac'h euz gwallet.

- Ouzoc'h ervad, va mam, emeuz  
mez dre ar c'hlae'har hag ar c'heuz  
na paz oun pardonet gant Doue,  
va mam baour, pardounit ive.

euz a dan ar plukator e teuan  
da dan ann ifern eo ez ann,  
da dan ann ifern da zevi  
ma na gerit va fardoni.

- penaoz e vez te pardonet  
re ec'h euz Doue offanset  
re ec'h euz Doue offanset,  
pevar bern ed c'heuz din devet.

- Ouzoc'h ervat, va mam em beuz  
mez dre ar c'hlae'har hag ar c'heuz  
na paz oun pardonet gant Doue,  
va mam baour, pardounit ive.

euz a dan ar plukator e teuan  
da dan ann ifern eo ez ann,  
da dan ann ifern da zevi  
ma na gerit va fardoni

- penaoz e vez te pardounet  
re ec'h euz Doue offanset  
/re ec'h euz Doue offanset/

( Iann Es-Kolwenn hag he baeron)

/triouac'h loen gorn ap/  
devet eo'h euz din an ti forn,  
kaera loened, triouac'h loen gorn.

- Ouzoc'h ervad, va mam, em euz  
mez dre ar c'hlae'har hag ar c'heuz  
na paz oun pardounet gant Doue  
va mam baour pardounit ive.

- Euz a dan ar plukator e teuan  
da dan ann ifern eo ez an  
da dan ann ifern da zevi  
ma na gerit va fardoni.

- Penaoz e vez te pardounet,  
re ec'h euz Doue offanset,  
re ec'h euz Doue offanset,  
daou lamp arc'hant, daou aour 'c'heuz laeret

- Ouzoc'h ervad, va mam, em euz  
mez dre ar c'hlae'har hag ar c'heuz  
na paz oun pardonet gant Doue,  
va mam baour, pardonit ive.

Euz a dan ar plukator e teuan,  
da dan ann ifern eo ez ann,  
da dan ann ifern da zevi  
ma na gerit va fardoni.

- Penaoz e vez te pardounet,  
re ec'h euz Doue offanset  
o laza 'r belek oc'h ann aoter  
pa gonsakre korf hor Salver.

- Ouzoc'h ervad, va mam, em euz  
mez dre ar c'hlae'har hag ar c'heuz  
na pa zoun pardonet gant Doue  
va mam baour, pardonit ive.

Va mam, va mam, azioud<sup>o</sup> ho skoaz  
sellit, gwelit Jezuz er groaz  
henez en deveuz lavaret :  
Iann es-kolan zo pardonet

<sup>o</sup>(Rann-yezh Enez Vez =  
a-ziouzh, a-zloc'h)

- Mar doud pardonet gant Doue  
me es pardon, va map ive,  
pardonet 'vez nab a bardon  
a lavaraz an tad-paeron.

O tri mil al loar hag ar stered  
e tri mil an heol benniget  
eun ael euz an eny zo diskennet  
da gaout / Ian es-Kolan eo deuet  
/ganthan zo eet/

da gaout / Ian E-skolan eo deuet  
evit hen digemeret /ganthan zo eet/  
evit digemeret he ene  
da vont da repos gant Doue.

( Sell. e Bulletin de la Société Académique de Brest,  
tome 3, 1862-3, p. 382-400 : G. Milin, Iann es Kolmwenn,  
légende bretonne )

Dornskridoù Milin: Karaouennoù

6. MARKIZ GWERRAND - AL LEUR NEVE

iez Treger

Na kloarek Lambaul a /vonjoure/° ° a-us : lavare  
e ti Fieka /Kroac'halle/° pa errue ° a-us : Kalve  
-/he bonjour/°(ha)joa barz en ti-man, ° a-us: de mad  
Fieka Kroac'halle pa ne gwelann.  
Peleac'h 'ma Fieka Kroac'halle  
evit dont ganen d'al leur neve.  
- evit d'al leur neve ne daio ket  
Rak markiz Gwerrand deuz he gourdrouzet.  
- dont a rai ganen d'al leur neve,  
m'he deve drouk m'em bo ive.  
Markiz Gwerrand a c'houlenne  
dioc'h ar veserien barz er mene:  
- meserien, d'in-me leveret  
n'hooc'h euz ket gwelet ar c'hloarek.  
- eo eat duze dal leur neve  
Fiek Kroac'halle oc'h he goste,  
Brava daou zen vo el leur neve.  
ha markiz Gwerrand a c'houlenne  
barz el leur neve pa errue :  
- he bonjour ha joa barz el leur-man  
Kloarek Lambaul pa n'her gwelann.  
- 'Ma ahont e korn al leur neve  
Fieka Groac'halle oc'h he goste.  
Markiz gwerrand a /vonjoure/° ° a-us : lavare  
d'Kloarek Lambaul eno neuze :  
- Kaeroc'h eo da zillad, herve ar c'hiz,  
/evit ma c'he° va hini/ ha me markiz ° a-us : re  
- Na mar doun enn habit kaer man gwisket  
ar c'horf man en deuz hen gounezet.  
sarret oa da ialc'h pa oa paet  
ha va hini-me a oa digoret.  
Lez brema, Markiz, da ziskouriou  
vit ma komansomp ar gourenou.  
- vit da c'houren did-te ne d-inn ket  
paotr kalet oud am eus klevet  
da c'hoari ar c'hleze ne larann ket.  
N'oa ket he c'her peurlavaret  
triqueac'h kleze noaz zo dic'houinet,  
hini ar markiz zo ann naontekvet.  
Kloarek Lambaul enn dro a ruille  
kemend den a oa el leur neve,  
difen he zous koant diouz he goste.

Markiz Gwerrand a lavare  
da Gloarek Lambaul eno neuze :  
- Taol da gleze brema d'ann traou  
ni (a) vo mignonned hon daou.  
Kloarek Lambaul 'oa eunn den klouar  
a daolaz he gleze d'ann douar.  
N'oa ket he gleze d'ann douar peurdaolet  
Tricouac'h kleze noaz zo dic'houinet,  
hini ar markiz zo naontekvet.  
Markiz Gwerrand a lavare  
da Fieka Kroac'halle eno neuze :  
daoust eo did /pe/° vervel /brema/ patant °a-us: te  
pe dont ganen-me da Werrand.  
- Gwell eo ganen mervel brema  
p'eo maro ann hini 'garien muia.  
Tud al leur neve a lavare  
da varkiz Gwerrand eno neuze :  
- Markiz Gwerrand, fall hoc'h eus gret  
dispartia daou zen a eured.  
Doue ra bardonno ann anaoun,  
'maint ho daou war ar vaskaon  
eat int d'ober ho feoc'h gant Doue  
/Doue/° ra vezo gant ho ens. °a-us : peoc'h

Dornskridoù Milin : Kanacuennoù

7. SOUN ANN TORTIK

e ti an tortik me zo bet  
kalz a draou am euz gwelet  
-----  
e ti an tortik ema'r cher  
'z euz teir logoden oc'h ar ber  
-----  
teir logoden ha teir raz  
hag eun hanter stripou kaz  
-----  
daou gavel etal an tan  
map ha merc'h e peb unan.  
-----  
ha daou all war leur an ti  
map ha mero'h e pep hini.  
-----  
daou all er park o labourat  
hag a ia da heul ho zad.  
-----  
ha daou all en ti lochen  
ha daou all azioc'h he benn  
-----  
hag ar c'hrek enn he gwele :  
gouigour, gouigour adarre.

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

8. LOIZA /HAG ABALARD/° ° hag Abalard a zo bet  
diverket gant Milin e-unan

Gwechall pa oann bihanik er guer e ti va zad  
evit eur plac'h seitek vloaz me a ioa desket mad  
Me ouie kana r prefas kouls hag ann ofern bred  
ha konsakri hostiou koulz ha belek ebet.  
- Livirit din plac'h iacouank pa zoc'h a galz desket  
C'houi anavez al louzaouen pini awan ann ed ?  
- Lagad kleiz eur marvran ha kaloun eunn tousseget  
ann ad diwar ar raden noz gouel ian dastumet  
mac'h hadiz va louzou  
Kenta ma riz sorcerez da c'hout hag he oa mad  
parkad  
oa enn eur mesiad segal er gear e ti va zad  
eat ioa  
a ioa eat d'he hada triouac'h poezellad vad  
pa cent diwanet  
noa bet diwar n ezho nemet triouac'h skudellad  
Me a meuz eur c'hroufik bihan er gear e ti va zad  
neb a zigoro anezhan en dezo kalounad  
zo ennan teir aer viber o viri eur serpent  
Mar teu va zerpant braz e vezo nec'hamant  
ec e vez hen bevet  
neket euz a gik klujar /ken nebeut kevelek/  
nemed gant goad bugale kent beza badezet  
enn eur c'horn euz eur park kasit va c'hroufik bihan  
C'houezit tan war nezhan tec'hit pell diout han,  
Me ia brema d'ar maro p'oun dar maro barnet  
goude va fallagriez emeuz hen dellezet.

( dindan an darn-mañ, penn kentañ un eilstumm all  
eus ur skritur dishevel sklaeroc'h he liw, bepred  
a-berzh Milin ):

Kenta ma ziz d'ar studi da zeski ar gallek  
Me na ouien ger doue nemet ar brezounek  
brema me oar gallek ha c'hoaz skriva ha lenn  
ha c'hoaz miret oc'h eur belek da laret ha ofern  
- Na plac'hik pevarzek vloaz na din me leveret  
gant piou ez hoc'h hu bet koulz kelennet ha desket  
- Na gant eur c'hloarek iacouank a gichen ti va zad  
e oc desket din me ann drouk eleac'h ar mad  
ennhez na c'hase gant han na bemnoz d'ar zabad  
Kenta ma ziz d'ar zabat me a oc braz souezet  
o velet ar zorcerien hag ar zorcerezet.



Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

9. ( AN DAOU ZEN YAOUANK )

( Notenn : Ar ganaouenn-mañ skrivet well-wazh gant Milin war eil bann ar bajenn 8 ha trede bann ar bajenn 9, hep teurel ple ouzh ment ar gwerzennoù, nemet evit ar peder dibenn, a zo anezhi niv. 1 Dastumad Penwern : An daou den iaouank. Savet eo ivez e gwerzennoù 13 silabenn, pozioù peder gwerzenn kanet alies war un ton bale. Kanet eo bet da Penwern gant Jannet Kerguiduff, neerez gloan, Taole, 19 a viz kerzu 1850. Skrid Penwern a zo klokoc'h evit ur wech, nemet bepred ar c'hemmadurioù a zo luziet gantañ. Testenn Vilin a zo hep talbenn ha kentoc'h diaes da lenn .)

Selaouit eur complaisans  
great da zaoz zen iaouank  
daou zen a gondition  
estimet enn ho farrez  
gant an dud a feson.  
n'ho deuz nemet unnek vloaz  
pa ho deuz en em joazet.  
partout el leac'h m'en em gavent  
enn hent gant ho loened  
ann hini en deveze gwasa  
egile er sikoure  
ber e kavent ann amzer  
o tremen ho buez.  
paz int daouzek vloaz echu  
int eat d'ar c'hatekiz  
e kommansont adarre  
hag e reont ar c'hiz  
ober a reont ho zri fask  
e-mesk ° ar vugale  
atao e kreske gantho  
chaden an amitie.  
setu ho zud o welet  
merk euz ho fidelite  
a lakeaz o separi  
ann eil dioud egile  
ho zud ne ouient ket  
ar finessa ho doa  
ar goaz a ouie skriva  
hag a gase lizerou  
er vech er sizun

°a-us : e-touez

..... ( Amañ e tle bezañ ur  
poz war ar plac'h kaset  
d'ar gouent. Kv. Penwern,  
niv. 1 )

da glevet ho c'helou.  
 echu e ra ann amzer  
 ma teu ar plac'h er meaz  
 ne deuz ket ar bouer  
 d'he ober leanez  
 ma kommansont adarre  
 evel ho gweach kenta  
 chaden an amitie  
 n'eo ket da zistruja.  
 beteg eur bloaz war n ugent  
 ho deuz en em heuliet  
 ken a ze deut ar poent  
 da denna d'ar billet  
 na pa zeo eat er gramp  
 evit monet da denna  
 e zantaz he holl vemprou  
 o tonet da grena  
 Setu na ma lavare  
 a vouez huel  
 na ma teuje ganthan  
 ann umero izel  
 en deus astennet he zourn  
 hag eat ebarz er renk  
 e teuas ganthan  
 ann umero hugent.  
 Setu mantret e galoun  
 ha beuzet gant glac'har  
 ken a garje  
 beza eat e k(reiz)  
 ann douar  
 Setu ma zo  
 annoncet d'esh(i)  
 gant he gamaraded  
 petra en doa tennet  
 na pe seurt billet.  
 Setu ma lavare  
 (aben) ma partije  
 o velje he liana  
 he lakat enn he bez.  
 er sul arack ma partiaz  
 ez int en em gavet  
 na da ober ho c'himiad  
 ez int en em laket,  
 ann daolou euz ho daoulagad  
 ken a c'hlepie ho dillat  
 korn ar c'hleuz arretet  
 ec'h ober ho c'himiad

( An daou zen yaouank )

/ann dae/ da Zoue  
 pa rankan partia  
 ouzoc'h° merk a garantez  
 ouzoc'h a c'houlennan  
 ar mouchouer zo ganeoc'h  
 o sec'hi ho taelou  
 me c'hallin sellet outhan  
 beteg fin va deisiou.  
 emeuz° a greiz va c'haloun  
 (ia'ta)° va mignoun ker  
 ec'h astennan va dourn  
 da rei va mouchouer.  
 lakit hen enn ho kodel  
 (ha) dalc'hit mad dezhan  
 ma n'ho pezh soulajamant  
 o tonet d'her visita.  
 dioc'h al liou a zougit  
 ne vo ket hir ho konje  
 c'houi a vezo taol distaol  
 euz an eil hopital d'eben  
 a ben eiz dervez goude e teuas ar c'helou  
 da lavaret oa maro nag he dous enn arme  
 a ben ann daouzek deiz goude hi a varvas ivez  
 Doue d'ho fardouno war ho gwir galoun°.

° kempren: evit (Penwern)

° = demeus (Penwern)  
 ° Penwern en deus : emei

° Penwern en deus : o sellet  
 diountan

° lenn: garan-  
 tez

vvvvvvvvvvvvvv

Dornskridoù Milin: Kanaouennoù

10. KELENNADUR AR ROUE SANT SALOMON

Selaouet gant eur spount gwirion  
kelen ° ar roue Salomon. ° a-us : vad  
Skrivet hen doun enn ho spered  
ha biken ne rafed pec'hed.  
red eo mervel evel eun tenn  
Mont dirag ar barnar souveren.  
goude'r maro eur varn spountus:  
mont d'ar c'hloar pe dan tan paduz.  
Ar pezh zo koz ma ren er bed  
e-touez pep seurt tud ar pec'hed  
eo a boan e kaver unan  
a zonzh enn he fin divezan.  
Rak ar c'horf hervez he natur  
ne glask nemet he blijadur  
ha koulskoude ember heb mar  
ez ai da vreina enn douar.  
ar c'horf a zo enn pep fesoun  
/ken/ pitouil ha kunv vel tud mignoun  
goude beza bet re vaget  
e vo /ivez/° boued dar premed. ° a-us: d'he dro  
ar bed man a zo ken treitour  
evel eur bluen war ann dour  
ann nep en em fio ennan  
a vo hep mar faziet ganhan.  
Laret a ra e roi hir vuhez  
dar re a zo war bord ho bez,  
ha d'ar re iac'h ne glanfont ket  
ha d'ar re glanv distrei e iec'hed.  
na laket ket ho kalounou  
er bed man da zestum madou  
rak madou, pa vent destumet  
ne dint netra nemed moged.  
/Rak/ goude /kemend/ m'ho po en em lazet  
evit dont pinvidik neurbed  
petra ho po evit ho poan  
pa /zortif/ z eot° diwar ar bed man: ° W: eoc'h  
eur goz linsel pevar blanken  
eunn dorchon blouz dindan ho penn  
setu eno ho tigwez den  
evit ho madou n'ho po ken.  
Na fiet ket enn ho iec'hed

e iacouankiz nag e gened  
 ar maro /zo/ krenv /hag/ da ziskar  
 ar re nerzusa d'ann douar  
 ne /deuz/° brasder galloud ebet  
 madou na noblans na gened  
 /helfe/ tec'het lezen ° ar maro  
 ho falc'hat a rei pa garo.  
 Sonjit eo arru ar maro  
 ma e kichen ho seulio.  
 ha ne hellit ket dale pell :  
 en em renkit evit mervel.  
 goude ma viot-hu 'ta marvet  
 ho kerent, ho mignouned  
 ho kaso holl da doull ho pe  
 eno ho lesfont goude ze.  
 /el leac'h se eo/° e finvezo  
 ho sked, ho joa ho pombanso  
 eno n'ho po mignoun ebet  
 nemed tign, kountroun ha preved.  
 sonjit eta /ervad/° enn traou ze  
 epad m'emoc'h c'hoaz e bue,  
 ha pa zai ho korf d'ann douar  
 hoc'h ene a nijo d'ar c'hloar.

° a-us: hell

° a-us: griz

° a-us : eno ivez

° a-us : mad

vvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvv

( Keñveriañ e Levr Kantiko reizet gant an otro F. Guil-  
louzic, Zant-Briek, ar werz-mañ dindan an taibenn: Ar  
maro, hag o Kregiñ gant ar c'homzou: Chilaouet gant spont  
hag eston. N'em eus nemet an eil mouladur eus 1900. N'eus  
forzh penaos e seblant an destenn gozh bezañ bet adreizhet  
kalz, evel er mouladurioù eus Kantikoù Eskopti St Brieg  
deuet war lerc'h hemañ. Yeun ar Gow avat, en e levr : Ar  
Grasou pe ar Pedennou evit ar re varo, Ar vuhez Kristen,  
Rosko, 1945, p.88, a seblant bezañ chomet fealoc'h d'ar  
c'homzou bet klevet gantañ.)

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

11. ( IANN A ZO EAT DA POMPILLER )

Iann a zo eat da Pompiller  
 da gerc'hat dour gant he bicher  
 pevar ugent leo zo ac'haleñ di  
 n'ouzoun dare peur e tistroi

Dousik ar c'hrek pen deuz klevet  
 d'ann ti affo zo diredet  
 hag out-hi en deuz goulennet  
 - Iann da beleac'h ez eo eet ?

Iann a zo eat da Pompiller  
 da gerc'hat dour gant he bicher  
 pevar ugent leo zo ac'haleñ di  
 ne oar dare peur e tistroi.

Iann war ann hent p'edo 'vonet  
 eur gwerraer gant-han zo erruet  
 hag oc'h Iann en deuz goulennet:  
 - da belec'h ez it-hu, leveret ?

- da gerc'hat dour dam grek duze  
 a zo klan fall war he gwela.  
 ar gwerraer pen deuz her c'hlevet  
 da Iann en deuz lavaret :

-ho kreg ne deuz ket a glenved  
 deut ganen-me ma n'em c'hredet,  
 deut em faner-me da guzet  
 ha me 'iel enn ti da velet.

gant eur potr iacouank eo kousket.  
 Hag en ti paz eo erruet  
 noz vad en deuz lavaret :  
 - noz vad da dud ann ti nan  
 ha me vezo koaniet aman ?

ar c'hrek e devez respountet°  
 dar gwerraer pe deuz he glevet:  
 - deut da doma etal ann tan  
 da c'hedal ma vo dare koan.

°a-us : lavaret

oc'h an daol paz int azezet  
da gana ez int en em lekeet  
ho c'hanouen p'ho deuz kanet  
ar gwerraer en deuz lavaret :

-----  
- Me meuz eur c'hillog em faner  
hag (a) oar kana ge ha kaer.  
Iann pen devez her c'hlevet  
euz he baner zo dilammet.

-----  
Da c'hoari 'r vaz zo em lekeet  
ha gant Janned eo komanset  
Ar paotr (iaouank) dre'r prenestr zo lammet  
ha Iann d'he c'hrek en deuz lavaret :

-----  
- diviz etrezomp a vezo greet  
ne chommin ket ganoc'h Janned

vvvvvvvvv

( Keñveriañ Penwern 112, follem 14, niv. 468 : Ed e  
Ian da Pompillier )

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

12. ( AN AOTROU TREGONK HAG HE BRIED - AN AOTROU NANN )

An aotrou Tregonk hag he bried  
iaouankik flamm zo demezet  
unan daouzek, eunn all trizek.

-----  
Abenn eur bloaz goude'n eured  
eur mabik kaer hi ho deuz bet

-----  
- Va fried, petra a gafoc'h mad  
p'hoc'h eus din ganet eur seurt map.

-----  
- eun tam kik kevelek pe c'had  
penefe ve poan mont d'he gero'hat

-----  
pa oa digwezet er c'hoad Braz  
eur vaouez koz eno a velaz,  
hag hi dezhan a lavaraz :

-----  
- pe vervel zo gwell enn heur ma  
pe chom seiz vloaz da langisa.

-----  
- gwell eo ganin mervel brema  
get chom seiz vloaz da langissa.

-----  
rak va fried a zo iaouank  
hag e deufe kalz nec'hamant.

-----  
Erruet er gear e lar d'he vamm :  
- mervel brema siouaz! a rankann.

-----  
Kerc'hit d'in affo ar belek.  
Ne anzavit ket oc'h va grek.

-----  
ken a vezo he fenn binnisiet :  
- Va mamm d'in me leveret

-----  
na perak e ouel ar plac'hed.  
o c'hober ar c'houez ez int bet  
ha teir liser wen zo kollet

-----  
- teir liser wen a deu, a ia,  
teir liser ama n'int netra.

- Va mamm, din-me leveret  
perak e ouel ar mevelliet.

- eur maro'h karroz a zo maro  
a dalie kant skoet pe war dro.

- Kant skoet a deu, kant skoet a ia  
kant skoet ne dint aman metra.

- pa zeulo va fried dous enn dro  
gant-han neuze m'en em glevo.

- Va mamm, din-me leveret  
na pe e du na pe e gwenn  
ez ear da vinnisien ar penn.

- va merc'h e du gwell 'get e gwenn  
ez ear da vinnisien ar penn !

Bremañ eo deut ann edit mad °  
da viska e du gwrazez ar stad.

- Va mamm, d'in me leveret  
perak eo va bolz digoret ?

- Va merc'h, evit lakat da bried  
eo hor bolz-ni zo digoret.

- Dalit, va mamm, va alc'houesiou  
evit ° rei /d'ar paour/ va madou

° ( Lezennoù da la-  
kaat urzh er gwiska-  
mantoù a zo bet em-  
bannet meur a dro.  
Eus pehini e komzer  
amañ ? )

°a-us : mont da

vvvvvvvvvvvvvv

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

13. ( AR C'HOUNTES HOLL HAG HE BRIED - AN AOTROU NANN )

Ar c'hountes holl hag he bried  
a zo iaouankik dimezet (bis)

unan daouzek vloaz, eunn all trizek  
war benn an nov mis gwiliodet (bis)

- Va fried brema p'hoc'h gwiliodet  
Petra d'ho koan a c'hoanteet ?

- Va lod euz eur c'hounikl bihan,  
va fried, pa ne ve ho poan.

- pachik, pachik, pachik bihan  
te zo diligent ha buan.

distag din daou pe dri levran  
ma zin er c'hoad da herzal.

ebarz er c'hoad pazeo antreet  
eur geiel dezhan a zo roet :

- Ar geiel man me ne nezann  
hinkin ha gwerzid a rankan.

- Lennit-hu ar geiel tro war dro  
'welot enn-hi skrivet ar maro.

Da vervel brema enn heur brezant  
pe chom seis vloaz e langissant.

- Gwell eo ganen mervel enn heur brezant  
'get chom seiz vloaz e langissant.

'get chom seiz vloaz e langissant  
abalamour d'am fried iaouank.

abalamour d'am fried iaouank  
hag a gemerfe nec'hamant.

- Pachik, pachik, pachik bihan,  
te zo diligent ha buan

kerz-te da gerc'hat din ar belek;  
Lavar dezhan na zaleo ket (bis)  
gant eur walfran zour oun bet skoet

- Va mam, an introun, din leveret  
ha peleac'h eo choumet va fried ?

- Ma eat d'ar gear da di he dad  
ema eno o tibri chervad.

- Va mam, an introun, din leveret  
evit petra 'ouel ar mevelliet ?

- eur marc'h karroz a zo maro  
a dalie kant skoed e pep bro.

- Livirit dezho na ouelint ket;  
me rai ho akord gant va fried.

- Va mam, an introun, din leveret  
evit petra e ouel ar plac'hed ?

- Er ster o kanna ez int bet;  
leceriou moan ho deus kollet.

- Livirit dezho na ouelint ket  
me rai ho accord gant va fried.

- Va mam, ann introun, din leveret  
petra eo ar c'han am euz klevet ?

Lambaolinier iacuank a zo ama  
ha ne baouezont o kana

- Va mam, ann introun, din leveret  
evit petra e du em gwisket ?

- Ar o'hiz a nevez a zo deuet  
va merc'h, etouez ann introunezet,

ma vezent gwisket e du e gwenn  
da vont da vinnisien ho fenn.

- Va mam, ann introun, din leveret  
piou a zo bet ken /affrontet/°

piou a zo bet ken /affrontet/°  
na da zigeri bolz va fried ?

°a-us : divezet

°a-us: divezet

( Ar c'hountes Holl hag he bried - An Actruu Nann )

- Va merc'h, ouzoc'h nac'h n'ellan ket  
ho pried ar c'hont a zo marvet.

- he fenn var he bruched a lekeaz  
eur c'hoarzaden outhi a reaz.

- va mam, it d'ar gear da gaout va map  
Me choumo ama gant he dad.

vvvvvvvvv

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

14. AR PLAC'HIG SEIZ VLOAZ

Mar plij ganehoc'h e selaoufed  
eur verz nevez ° kompozet °a-us : zo  
d'eur plac'h seiz vloaz ez eo gret.  
he nam diganhi zo marvet  
eunn didalvez, eur butuner  
ar verc'h en noz ouz al loar skler  
a ia da glask he zad d'ar ger.  
hag he zad o tont d'he fedi  
da zonet gant han barz enn ti  
evit rei dezhi da eva,  
evit he lakat da vesvia.  
- N'evinn banne ha nep banne  
va zad, /emezi, deut/° alese. °a-us: deut d'ar gear  
pa oant /euz/° meaz ann hostaleri °a-us: e  
da zont° a goste 'pedaz anezhi. °a-us: /hen he fedaz/  
- Va zad, eme hi, ne dinn ket  
ne dinn d'ober eur seurt pec'hed.  
- Ma ne res-te ket ar pec'hed  
te 'iel warc'hoaz da glask da voued.  
- Gwell eo garen mont da glask boued  
evit ober eur seurt pec'hed.  
Tri zervez hanter ez eo bet  
nep kacout bruzunen ed ebet  
hag hi da antren enn eun ti,  
goul eun tamm bara da zibri.  
Ar c'hrek dezhi he deuz laret :  
- It alese da c'hounid boued.  
hag hi da vonet ac'hane  
da bignat enn eur park neuze  
da c'hout hag hi 'gavje 'r c'hreunen  
a roje d'he c'haloun souten.  
Dre gemend m'he devez baleet  
ne deuz kavet greunen ebet.  
etal ar gouent eo arruet :  
goulen kovez hi e deuz gret,  
ma raje he c'homunion genta,  
kent monet diwar ar bed-ma.  
pa roet dezhi eur binijen °a-us : setu 'r  
/arruet ar/° verc'hez enn he c'hichen



- Perak e roez-te pinijen  
da eunn eal zo gwisket e gwen  
hounnez a zeui ganen d'am zi  
ha te choumo enn da hini.  
el leac'h m'oa bet o c'houlen boued,  
ar vrek he doa he reuzet  
he holl madou a zo devet  
hep n'oe gwelet /na/ tan na moged

vvvvvvv

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

15. ANN DURZUNEL

Kalz a amzer amez kollet o stigma va lasou  
klask tizout ann durzunel kousket war ar brankou.  
Na distignet eo va las ha tennet em eus fall,  
tec'het eo ann durzunel ha nijet er c'head all.  
Dioc'h ann noz ha dioc'h ar mintin me 'ghev al laboused  
o kana dre ar c'hoajou, e blenchou 'r gwez pignet.  
Ne deuz hini anezho hag a drid va c'haloun  
par ma ra ° ann durzunel o ouela he mignoun °a-us:mouez  
- ma teu ar chasseur iaouank da ober din° mervel °komp:  
birviken n'ankounac'hain maro ann durzunel. dei  
ma teu ar chasseur iaouank da ober din° mervel °komp:dei  
me a varvo gant glac'har ia d'am mignoun fidel.

-----  
petra eo ta, turzunel, a dammant ho kaloun ?  
- maro eo, emezhi, va fidela mignoun  
-----

Dornskridoù Milin : Kanacuennoù

16. AR BUGEL PEMP BLOAZ

Nep° en deuz c'hoant da ouela truez °a-us : Ann him  
et dillun d'ar C'hastel nevez,  
et dillun d'ar C'hastel nevez  
c'houi a ouelo kalz a druez.  
c'houi a welo krouga, leski  
brava plac'hik a vo enn hi,  
c'houi welo krouga Mari Gabiten  
hag he breur kaer enn he c'hichen.  
Ar plac'hik pemp bloa a lare  
d'ann dud a justis eno neuze :  
- Lezit va mamm hep he leski  
me a iel enn tan evit-hi.  
- ho! plac'hik pemp bloa, n'efet ket  
pa n'hoc'h euz ket hen dellezet.  
Ar plac'hik pemp bloa a lare  
toull dor he zad pa zigweze :  
- Va zad, digorit d'inn ann or  
ho merc'h pemp bloa a c'houl digor.  
- Plac'hik pemp bloa, d'in leveret:  
hag ho mamm baour pe leac'h eo eet ?  
- Va mamm zo krouget ha losket  
he ludu enno avel gwentet.  
- plac'hik, plac'hik, d'in leveret  
petra ann abek e doa gret ?  
- Abalamour d'eur bugel bihan  
e devoa krafunet enn tan .  
- M'he divije din lavaret  
m'em bije 'r bugel anzavet.  
plac'hik pemp bloa, iit alese  
gant acun ann avel ma trofe.  
Ma teufe 'nn avel diwar Folkoed  
dre doull ann alc'houe vec'h loret.  
ar plac'hik pemp bloa a ouele  
e liorz he zad pa azeze  
- ho! Introun Varia ar Folgoad  
hou man zo din eur galounad:  
krouget va mamm, loret va zad  
e liorz he zad paz eo azezet  
hag eno hi a zo marvet  
eur blanten warn-hi zo savet.

Dornskridoù Milin : Kanacuennoù

17. ( EUL LUNVEZ GOUDE KOAN...)

eul lunvez goude koan pa cunn-me koaniet mad  
ha me mont d'am liorz evit bale eur pennad.  
Me klevet eu/nn eostik/° war ar bod o kana, °a-us: 1 labous  
kana a rea ker koantik, ker gae ker manivik  
giz ma ve eunn hograou peotramant eunn eostik  
ne deo ket ..... ez cunn-me ankeniet :  
va c'hildant zo o vreina ha va bleo zo louet.  
- Lavarit, plac'h iacuank, perak oc'h ankeniet,  
pe c'houi zo klan a galoun, spouronet ho spered  
- N'ounn ket klan a galoun, na troublet va spered  
gant keuz d'am iacuankiz /eo ez cunn ankeniet/°. °a-us: zo  
Nijet eo va iacuankiz, eat eo enn he roud abiou tre-  
hag em be peder askel n'oun ket vit he zizout. menet.  
hag em be pevar zroad hag henvel oc'h ar c'had  
da vont warlerc'h va iacuankiz n'helfen ket....

Dornskridoù Milin: Kanaouennoù

18. ( ME MEUZ BET EUR VESTREZIK ... )

Me meuz eur vestrezik n'euz ket pell a ze  
he c'homzo zo ker koant he zellou ker mignoun  
great e deuz eur prizoun da lakat va c'haloun  
ne ouzoun /oc'h/ petra zo henvel out hi  
pe eur rozen ruz, gwen, zo o vont da zigeri,  
pe eul lilien han rouanez ar bokejou  
zo hirio o tigeri ha warc'hoaz a zerro  
euz ann holl bokejou, me ne gavann hini  
henvel oc'h va douz koant, henvel oc'h roz Mari  
hounnez a vleunv er goan kerc'houlz evel enn han  
ken a deu gant ann amzer he griziou da zec'ha

.....

Dornskridoù Milin : Kanacuennoù

19. ( DEUT GANEN, VA MESTREZ ... )

Deut ganen, va mestrez eunn tu bennak a-gostez  
ha me ia da gounta dehoc'h eunn darn eus va buez.  
pell zo e leverer, hirroc'h ez eo gwir  
/ne deuz den war an douar/  
pa vez ann den euruz ne gav an amzer hir  
ne deuz den war ann douar na biskoaz ne deuz (bet)  
ken kiriek d'ar gwall deodou evel maz our-me bet.

.....

Dornskridoù Milin : Kanacuennoù

20. ( LEKOMP PEP A GORNAD BUTUN... )

Lekomp pep a gornad butun  
Trai da dirai la diron lon lire  
ann amouroust zo importun  
hag evomp-ni pep a vanne  
ann eil da iec'hed egile.

-----  
unan bennak zo het exprez  
oc'h va droug prezek d'am mestrez  
hag en deuz lavaret dezhi  
e kaven mad ann eaudevi.

-----  
C'hoaz en deuz lavaret ouспен  
e karien dour ar vinien  
ne ket he faot ma zoun goaz mad  
hag ez eo truillek va dillad.

-----  
enn eunn ti korn war ar menez  
ema va dous, va c'harantez  
abarz ann noz me he gwelo  
pe va c'halonik a vanko°

°a-us : ranno

-----  
va c'halounik ne ket market°  
va dousik koant am euz gwelet  
va dousik koant e velann  
kousket ganthi a c'hoantaann.

°a-us : rannet

-----  
eunn noz pe zicu pa ne raen ken  
me he c'haro da virviken.  
Ann hini gousko enn noz kenta  
a rai ann eil, ann diveza  
a rai ann eil hag an trede  
ha bete'r maro goude ze

vvvvvvvvv

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

21. ( HA P'EM ME KANT SKOED... )

Ha p'em me kant skoed ha me monet da roll,  
mont gantho d'an davarn evit ho frita holl.  
Pa deuin-me d'ar gear e livirinn d'ar c'hrek:  
fripet eo ar c'hant skoet, n'euz manet eur gwennek.  
Ar c'hrek a lavaro : - pep tra zo evelse.  
ganhoc'h int gounezet hag e reot adarre.  
azezit-hu aze e kichennik ann tan  
me gerc'ho d'ehoc'h eur banne da c'hortoz ho koan.  
Diviskit ho lerou hag iit enn ho kwale.  
Krogit em diou zournik ha va chachit ive  
hag antronoz vintin pa zavaz er-meaz ar c'hrek  
evit kounta 'nn arc'hant ne oa manet gwennek.

VVVVVVVVVV

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

22. VA MAP SILVESTIK

Pradik  
Etre /vali/ Sant Hervé ha penn parrez ann dre° <sup>°M:Tref</sup>  
euz eunn digentil iacuank o sevel eunn arme laouenan  
euz eunn digentil iacuank o sevel eunn arme  
/me meuz eur map silvestik hag a zo eat ivez/  
hag a ielo ive  
n'euz tad war ann douar ker glac'haret ha me  
Kenavo<sup>ezo</sup>/va map/ silvestik pa o'neuz bet ar vodante  
brema me va unan  
ken a vezi distroet nem bezo nemet poan  
da ouela, a zisec'ho ama gant g  
evel ar map prodik, aotrou Doue ta Silvestik  
ma vijez bet er gear e vijez  
te poa pemp kant skoet leve e kornik prez da dad (1)  
ouspen daou c'hant livr leve te oa eur fortun vad.  
hardisegez am euz mont a rinn  
Me meuz ann hardisegez da vonet d'he c'houlenn  
na digant evit mont  
digant tud a enor digant he gabiten  
- Aotrou ar c'habiten, na dir-me leveret :  
evit kaout Silvestik, c'houi vezo digollet.  
pegement a zo red ?  
Ni hon euz kalz a vadou lakit hen er valans  
madou  
Aotrou ar c'habiten, me roi he bouez a zevans  
ha ne deo ket c'hoaz awalc'h kement se  
me a roic ouspen dec'hu pouez va inkane.  
neuze  
ar c'habiten /pam c'hlevaz/ en deveuz lavaret :  
ounn meurbet  
- o klevet ho komzou me zo bras souezet.  
C'houi fell d'ehoc'h trompla'r roue ha kaout he zoudarded  
n'euz soudard em banden a garan evel d'han  
me meuz eul laouenanik e kichen toull va dor  
e kreiz etre daou venik eno e ra he c'hor

(1) Er marz war tu dehoù ar follenn e lenner ar bruzh-  
adoù-mañ: hep dale Silvestik - ganste dilezet - me ne vin  
biken laouen - ken a vezi distroet - o c'hadal da zistroi  
- a zec'ho gant - a zo eat d'ar brezel .



bemnoz                   bep mintin  
 dioc'h ann noz hag ar mintin ne ra nemed kana  
 me garje kacout eur galoun vije hevel out ha.  
 - te c'heuz diouaskelligou da vont dreist ar mor braz  
 kerz da gerc'hat din me kelou Silvestik c'hoaz :  
 - Debonjour dehoc'h Silvestik - ha did te hini bihan,  
 petra zo a nevez maz oud deut er vro man.  
 - Me zo digaset ama gant da dad glac'haret  
 vit kerc'hat da gelou, gout peleac'h oud choumet.  
 - disken 'ta laouenanik, disken war da zaou droad  
 me skribo did eul lizer da gas d'ar gear d'am zad.  
 me skribo did eul lizer evit he gas d'ezhan  
 aben daou vloaz ama m'en em gavo gant han  
 pa edon enn traougoadik  
 enn neizur em gwele kousket mad  
 me gleve ar merc'hed paour o kana soun va map.  
 eur plac'h iacuank  
 ha me sevel ac'hano ha komans da ouela  
 o va  
 /aotrou/ Doue, va map Silvestik, peleac'h emoud brema ?  
 petra rinn-me brema  
 peleac'h oud te choumet, marteze oud marc  
 a bell dreist ar mor bras pemp kant leo dioc'h da vro,  
 ar marc  
 Taolet da eskernigou da vont gant ann dour red  
 Taolet da zaouarnigou da zibri d'ar pesked  
 Pa edo he /vap Silvestik/ oc'h ober dezhan kaon  
 dad glac'haret  
 edo he vap Silvestik er gear oc'h he selaou  
 - Debonjour deoc'h, va zad, tavit, na ouelit ket  
 deut  
 Setu ho map Silvestik erru d'ar gear d'ho kwelet

ooooooo

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

23. HELIEROLLAND

o E korn dehoù ar follenn :  
M. Jeanne Perrot

Er bloaz man ez euz gwal vloavez  
 ma laz ho bugale er gragez  
 ma laz ar gragez ho bugale  
 helierolland a laz he re.  
 Lazet e deuz he map kosa  
 'vit ober aotrou'r iacuanka.  
 Helierolland a lavare  
 d'he flac'h a gambr en nozvez-se :  
 - iit holl dud ann ti d'ho kwele  
 nemet ar vatez vihan ha me.  
 'Hast ta buan, matez vihan,  
 te zo dilijant ha buan,  
 da lakaat dour var an tan  
 da skaota'r pennmoc'h goude koan.  
 ar vatez vihan e deuz laret  
 d'he mestrez p'he deuz he c'hlevet :  
 - nao bloaz zo m'ounn enn ho ti  
 ha n'ounn paet nemed euz a dri.  
 roit d'in ar penn moc'h hag he vuez  
 me laosko dehoc'h va nao blavez.  
 - ne po na penn moc'h nag he vuez  
 na noud ket sur euz nao blavez.  
 Helierolland a bigre d'ann neac'h,  
 eur gountel ganthi war he breac'h  
 hag ar goulou enn he dourn all  
 da laza he mab kosa e doa mall.  
 er gamp d'ann neac'h pa zeo pignet  
 he map kosa a oa kousket .  
 d'he map iacuank e deuz laret :  
 - Sko gant da vreur ann taol kenta  
 me rai an eil hag ann diveza  
 an eil, an trede d'he laza.  
 ar map iacuank en deuz laret  
 d'he vamm pen devez he c'hlevet.  
 Ar galoun, va mamm, n'am euz ket  
 da skei va breur hag hen kousket.  
 - setu<sup>o</sup> eur vagaden am euz maget  
 ne rofe eunn taol em reket.

o lenn moarvat : ar

o a-us : tama, pe kent-  
oc'h : sama

- nann, va mamm, ne rinn ket avad  
 pa n'am c'helennit d'ober mad.  
 n'oa° ket he c'her peur echmet, °a-us : e doa  
 he vreur helen° zo dihonet ° komp. moarvat : hena  
 war benn he zaoulin em strinket. sell. pelloc'h.  
 Pardoun oc'h he vamm en deuz goulennet:  
 - 'n han Doue, va mamm, n'am lazit ket.  
 ken m'ho komzet gant eur belek.  
 - Na po na belek na kloarek,  
 mervel brema did a zo red.  
 - 'n han Doue, va mamm, n'am lazit ket  
 m'ho kraï introun pa na d'hoc'h ket.  
 nao vilin zour meuz a leve  
 me a zino dehoc'h anez he.  
 me iel da zervich ar roue.  
 - Lavar da in Mamuz pa gire  
 emacoud aze leac'h ma varvi.  
 - pa z hoc'h a liet fall d'am laza,  
 va c'hasit d'ar mechaussi diana° °komp.: da vihanañ  
 ma velo va marc'h va merzeria.  
 - me meuz chas-red ha livrini  
 'lipo da c'hoad diwar al leur-zi.  
 - Ip manus tuas, Domine,  
 Jezuz kemerit va ene,  
 tre ho tiou voz da vont enn ne.  
 Olierolland zikenn d'an traou° °a-us : dereziou  
 ar goad ganthi enn he boutou,  
 ken a strinke /liamou/° he lerou. °a-us : enn  
 Olierolland a lavare  
 d'he mitez vihan enn nozvez-se ;  
 - Kea 'ta da gerc'hant gwin buhan  
 d'ar vestr helen a zo gwall glan,  
 ha n'ev banns anezhañ.  
 Mar gerru ganez Kervengi  
 na lavar ket da gevridi.  
 N'oa /ket/ eat /duk paz/ dioc'h ann ti °a-is: dek kammed  
 n'erruaz gant enn aotrou Kenvengi  
 /oc'h ar vatez 'n deuz goulennet/  
 goulenn a reaz oc'h ar vatez vihan :  
 - da beleac'h ez ez fennoz-mañ ;  
 - da gerc'hat d'am mestr zo klan  
 ha n'ev banns anezhan.  
 - Petra c'hoarvez gant va c'henderv Helen  
 ma n'ev banns euz da vin gwenn.  
 Ke karfac'h n'am diskulfac'h ket  
 me larfe dehoc'h petra /ve arruet/° °a-us: zo bet  
 ma enn he arched archedet kloz  
 abacou ann taol a hanter noz.

( Helierolland )

Kervengi p'en deuz he c'hlevet  
 da di he genderv helen zo eet,  
 nozvez vad en deuz lavaret :  
 - nos vad ha joa, barz en ti-man,  
 va c'henderv helen peleac'h eman ?  
 - Ma enn he vele mik kousket.  
 Komzit gvestad, n'hen dihonet ket.  
 - pe ma enn he vele pe nema ket,  
 va c'henderv Elen rankann gwelet° °a-us: a velinn fennoz  
 pa ve enn he arched archedet kloz  
 ha ma c'haloun ne harzfe ket  
 da velet arched va map digoret.  
 - Perak ho kalon ne arzfe ket  
 da velet arched ho map digoret.  
 pe d'he laza enn deuz harzet °  
 Ne doa ket he c'her peurechuet  
 n'oa leun ar porz euz a ronseed.  
 Helierolland a zo kemeret.  
 Helierolland eno a ouele  
 ha n'oa den eno he frealze  
 nemed eun archer iaouank rajé :  
 - Tavit, helierolland, na ouelit ket  
 d'ho kerc'hat da goumer ez omp deut,  
 d'ho kerc'hat da font d'ar veladen,  
 a zo hirio er pount guen.  
 Helierolland a lavare  
 na d'he c'hocher en dervez-ze :  
 - pourchas din me va inkane wen,  
 laka eur vrid arc'hant enn he fenn,  
 maz inn me kaer d'ar veladek.  
 Ar c'hocher en deuz lavaret  
 d'he vestrez p'en deuz he c'hlevet :  
 - ma n'hoc'h euz kimiadet, kimiadit.  
 d'ar prizoun da Vened eo ez it.  
 ( ur gwenn )  
 Biskoaz den ne dreuzaz ann aleio  
 nemet an aotrou Keriber.  
 hennaz en treuzaz gant an alter  
 klask rekour he bues d'ho vagerez,  
 mez re zivezat ez eo deuet.  
 Helierolland a zo dibennet.  
 Ann aotru Kervengi a lavare  
 da gerdangi en enn dervez-se.

- Me dije maget din nemed eur c'hroc'hen°ki °Komp, moarvat;  
 Me m bije miret dioc'h ar grouk anezhi: ur c'holen-ki  
 ne ket an arc'hant d'in-me a vankfe  
 pa ranken gwerza va holl leve  
 vit souten he buez d'he vagerez.

vvvvvvvvvvvvvvvvvvvv

( Kofveriañ Penwern, kaier 90, foldenn 281-284, niv. 195:  
 Goajilin ; hag an Uhel, Gwerzioù II, kentañ kentel p.272-  
 276 : Alliet ar Rolland, eil kentel p. 278-282 : Alliet  
 Rolland )

Dornskridoù Milin : Kanacuennoù

24. ANN ANACUN

Eur plac'hik keaz a ouele flamm  
 gant ar c'hoant°da welet he mamm. °a-us : c'haon he doa d'  
 gant ar c'heuz he devoa dezhi  
 goude m'oa maro digant-hi  
 ouela 'rea hag huanadi  
 ha n'oa den vit he frealzi° °a-us:enn noz, en deiz ar  
 bete zoken° he c'hovessour °a-us:meaz, en ti  
 en doa poan vraz war he zikour. °a-us:ann holl kerkoulz  
 rei a reaz eunn ali dezhi  
 evit gallout he frealzi :  
 mont spad teir nozvez, 'mezha,  
 mont war he bez da loja,  
 Ne vankaz ket ar genta nosvez  
 ez eaz ar plac'h-mañ war he bez.  
 Ar c'henta tavancher a gasas  
 war bez he mamm her lekeaz.  
 pa velaz allumi ar goulou  
 e lezaz ann tavancher eno  
 hag ez eaz neuze da guzet  
 er govesion leac'h m'oa kelennet.  
 da boent ma teu ann anacun °a-us : en dro  
 da ober ° he procession.  
 Divizet int e teir banden :  
 re zu ha re vriz ha re wenn.  
 touez ar re zu edo he mamm.  
 na p'he gwelaz pebez estlamm !  
 hag hi o krigi enn tavancher  
 hag e regi /e c'housac'h karter/° °a-us: dre an hanter  
 ne vankaz ket ann eil nosvez  
 maz eaz ar plac'h-mañ war he bez.  
 an eil tavancher a gasas  
 war bez he mamm her lekeaz.  
 pa velaz allumi ar goulou  
 e lezaz ann tavancher  
 hag ez eaz neuze da guzet  
 er govesion leac'h moa kelennet.  
 da boent ma teu ann anacun  
 /divizet/ int e teir banden°: °a-us: rannet...etre...  
 re zu ha re vriz ha re wen. ledenn  
 e-touez ar re vriz edo he mamm.

na p'he gwelaz pebez estlamm !  
 eur c'hoar he doa ar plac'h-se  
 a wilioudaz en nosvez-ze.  
 dre ma zeo bet poll e poan  
 genel a reaz eur verc'h vihan.  
 ac'hano ez eaz da Landreger  
 evit lakaat he heuvel.  
 Ar belek out-hi a c'houlennaz  
 hag enn hano he mamm he lekeaz,  
 enn hano he mamm e lekeaz  
 hag ann noz-ze 'r plac'hik a varvaz.  
 'n tro noz he c'hovessour en deuz laret  
 eur pec'hed braz hoc'h euz-hu gret  
 p'hoc'h euz ann noz-man manket.  
 Brema p'hoc'h eus her kommandet  
 e ranko beza finisset.  
 Ne vankaz ket en trede nosvez  
 ez eaz adarre war he bez.  
 ann trede tavancher a gasaz  
 war bez he mamm he lekeaz.  
 Pa velaz allumi ar goulou  
 e lez ann tavancher eno  
 hag ez eaz neuze da guzet  
 er govesion leac'h m'oa kelennet.  
 Da boent ma teu ann anaoun  
 da ober en dro he frocession,  
 divizet int e teir banden :  
 re zu ha re vriz ha re wenn.  
 e-touez ar re-man edo he mamm.  
 na p'he gwelaz pebez estlamm  
 hag hi kregi enn tavancher  
 heb e regi dre an hanter  
 da gas dezhi er govesion.  
 - Gant Doue te a zo bet miret  
 pa n'oud ket garen dispennet,  
 evel maz eo da davancherou,  
 rak kreski a reant va foaniou.  
 Ar plac'hik bihan a c'heuz hanvet  
 em hano ec'h euz hi lekeat  
 hounnez e deuz a boan tennet  
 breman ma ia d'ann eurusded  
 ha te zo great ivez da blas  
 Rak se ta bez e stad a c'hras.

vvvvvv

Dornskridoù Milin; Kanaouennoù

25. ANN HINI GOZ

Ann hini goz eo va dous  
 ann hini goz eo zur.  
 ann hini goz e deuz arc'hant  
 ann hini iaouank a zo koant.  
 ann hini goz a zo loudour<sup>o</sup>  
 ann hini iaouank a zo flour<sup>o</sup>  
 ann hini goz e deuz leve  
 ann hini iaouank e deus dle  
 ann hini goz e deuz boued  
 ann hini iaouank ne deuz ket  
 ha gous(kou) pen em zonzan  
 an hini iaouank ar goanta.  
 evel na zint deut da greski  
 hag ez int kenchet e bleizi  
 e pariz hag er c'heriou braz  
 ar wen anezho a savaz.

<sup>o</sup>a-us: he devez acur  
<sup>o</sup>a-us: a zo paour

vvvvvv

( Notenn : an daou bez diwezhañ, eme J. Ollivier, ne  
 seblantont ket klotañ gant Ann hini goz )

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

26. PENHEREZ KEROULAZ

Va mamm baour ma n'am c'harit  
da Gerthomaz va eureujit,  
ha mar her grit, grit hen affo  
ma erru ar markiz Meal er vro.  
- Allaz, va merc'h, iacuankik oc'h,  
dispoz n'hellan ket ac'hanoc'h.  
Minorez oc'h aberz ho tad,  
konje ho lignez a gafenn mad.  
- Va lignez euz a gostez va zad  
biskoaz n'ho deuz karet va mad,  
nemet va c'hourdrouz va c'has abell  
evit beza euz va leveou gwell.

-----  
ar vatez vihan e deuz lavaret  
d'ar bennherez pe deuz he c'hlevet :  
- va mestrez, en em breparet,  
deut eo ar markiz d'ho kwelet.  
hag hi e devez respountet :  
- Markiz Meal, me n'am bo ket  
Kerdomaz a rankann da gacuet  
Kerdomaz me am bezo °a-us: ne lavaran ket  
°a-is: eo  
pe va c'haloun a ranno.  
Ar Markiz Meal en deuz goulennet  
ebarz en ti pazeo diskennet :  
- debonjour ha jca en ti man  
ar bennherez peleac'h eman ?  
ar bennherez e deuz lavaret  
da varkiz Meal pe deuz her c'hlevet :  
- Markiz Meal me n'am bo ket  
Kerdomaz a rankann da gacuet,  
ia, Kerdomaz me am bezo  
pe va c'halounik a ranno. +  
Ar Markiz Meal en deuz respountet  
d'ar bennherez pen deuz he c'hlevet :  
- biou ti Kerdomaz ounn tremenet  
ha netra vad meuz ennan gwelat  
nemed eur poul e kichen e di  
so, mad da vragal d'ann ouidi.

- gaou a levez, Markiz Meal,  
noud ket tremenet abiou he gear.  
ne deuz prenest ebet war he di  
n'en deuz arc'hant /ouz/° d'ho alaouri °a-us: a-walc'h  
ar mechaussi braz e ti he dad  
a dal, Markiz Meal, da holl vad.

-----  
ar beorien geiz eno a ouele  
ha noa den ho frealze (bis)  
nemed ar bennherez a rae :  
- Tavit, peorien °, na ouelit ket  
deut da Gastell gall d'am gwelet(bis) °a-us: geiz  
aluzen bemdez a vezo roet.  
Ar markiz Meal en deuz lavaret+  
dar bennherez pen deuz he c'hlevot :  
-aluzen bemdez ne vezo ket roet  
Rak hor madou ne badfent ket,  
beb eil dervez ne lavaran ket°

-----  
Ar bennerez a lavare °  
d'he matez vihan enn dervez-ze :  
- Petra zo a nevez er vro-ma  
ma klevan ar pave o krena.  
- na markiz Meal, war he gantved°  
zo erru, Pennherez d'ho gwelet,  
- ha pa ve erru war he zaou c'hantved  
vit Markiz Meal n'am bezo ket.  
hag er gear pa zec antreet  
e ti ar bennerez eo diskennet  
bonjour en deuz lavaret  
komz gant ar bennherez en deuz goulennet

pep eil dervez ne lavaran ket  
ar bennherez e deuz respountet  
da varkiz Meal pe deuz her c'hlevot:  
+ - aluzen bemdez a vezo roet  
aluzen da zul, aluzen da lun  
hag aluzen epad ar sizun.

-----  
ar bennherez a lavare  
d'he flac'h a gramp enn dervez-se :  
- me vel erru er vali c'hlas  
eunn digentil gwisket e glaz  
henvel oc'h ann aotrou Kerdomaz.

( Penherez Keroulaz )

Kerdomaz a lavare  
da varkiz Meal en dervez-se :  
- Debonjour a joa en ti-man  
peo eat ganez nep a garann. +3 °Komp.: henaf  
ro din me da c'hoar ennar°  
peo eat ganez nep a garan. ° a-us : Kerdomaz, deuz  
Disken markiz Meal; deuz en ti  
n'oud ket refuzet anezhi.  
pa vezo eur banket finisset  
eunn all a vezo koumanset +4

-----  
Ar bennherez e deuz lavaret  
d'he flac'h a gramp, deiz ann eured:  
- digas din-me va c'horf saik  
rak va c'horvik zo gwiridik,  
Rak va c'horv zo gwiridik braz  
gant ar c'heuz euz a Gerthomaz.  
ar bennherez e deuz lavaret  
dar pachik bihan affo moned,  
moned buan da Gastel Gall,  
da laret d'am mam ez eun klan fall.  
ar pachik bihan a gemer ar c'harroz  
da vont da Gastel Gall fennoz.  
Da Gastel Gall me a rank moned  
ha pa vankfe eul loan pep gammed.  
E Kastel Gall pa zec erruet  
debonjour en deuz lavaret :  
- Debonjour ha joa enn ti-man  
ar varkizes koz peleac'h emañ ?  
donet buhan da Gastel-gal  
rak he merc'h a zo klan fall.  
p'edont o tont gant ar vali c'hlas  
e klevjent ar c'hleier o sini glaz  
e weljont ann iliz du steignet  
ar bennheres a zo marvet. x2  
vvvvvvv

( War trede bann ar bajenn 19, e kavomp an notennou-mañ: )  
ar markiz Meal en deuz lavaret  
d'ar bennheres p'en deuz he c'hlevot  
- aluzen bemdez ne vezo ket roet  
rak hor madou ne batent ket  
bep eil dervez ne lavare

2x n'eo ket bet gant ar markiz o kousket

3 Kerdomez a lavare  
d'ar markiz Meal enn dervez-se  
enn eunn enezen e kreiz ar mor  
eo anterret va gwir Azenor  
hogen me rai evel ann ouidi  
me iel war neun de gwelet di

( Ar poz diwezhañ-mañ a zo moarvat da stagañ ouzh ar sin  
+ kentañ : pe va c'halounik a ranno. )

Ne ket abalamour d'ho kened  
e teuan pennherez d'ho kwelet  
abalamour d'ho leveou braz  
a zo stag oc'h maner Keroulaz.

vvvvvvvvv

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

27. ANN AOT. GLUDONOÙ

Selanuit kana me ho ped  
eur chanson nevez kompozet  
d'ann aotrou Gludonou ez eo gret,  
da glask he voued a zo eet.  
Kenta aluzen en devoa bet  
oa eur skudellad iod silet  
hag ac'hano ez eaz da di'r Morvan  
da c'houl eunn tam bara d'he goan.  
Ac'hano da di'r Riou da c'houl beza lojet  
gant ar goanta euz ar merc'hed.  
- Gant ho merc'h Janned mar keret.  
Ann hini koz en deuz komzet  
d'he verc'h p'en deuz he glevet.  
- Va merc'h Janned, ne ouzhoc'h ket,  
Ahont euz eur paour deut d'ho kwelet.  
- O va Doue, ha /posubl/° e ve  
me mestrez /war/ bemp kant skoet leve  
eo eur c'hasker boued an he.  
Ann aotrou Gludonou pen deuz klevet  
euz a dal ann nor ez eo eet.  
he habit alaouret en deuz lekeet  
hag he zad dezhi en deuz lavaret:  
- Ann aotrou Gludonou ac'h euz refuzet.  
Va merc'h, ke buan, lavar dezhan mad  
me a zo koz, ne velann hanter berad.  
- Aotrou Gludonou, exkuzit d'am zad,  
va zad zo koz ha ne vel berad.  
Ann aotrou Gludonou en deuz lavaret  
da Janned ar Riou pen deuz he c'hlevet :  
- Janned ar Riou, ha c'houl ve kountant  
da veza Introun e traon ar stang ?  
Janned ar Riou pe deuz klevet  
Troad oc'h troad gant-han a zo eed.  
Ann Aotrou Gludonou pa seo erruet  
Debonjour hi e deuz lavaret.  
- Bonjour ha joa en ti-ma,  
digas eur gador din daseza  
peo ma vezo ar verc'h kaer ama.  
Ann introun goz, mam ann aotrou  
a lavarez da Janned ar Riou :

°a-us : red

- Merc'h kaer ama c'houi ne viot ket,  
na c'houi na merc'h tiek ebet.  
Janned ar Riou pe deuz he c'hlevet  
da ouela a zo en em lakeet:  
- Aotrou Doue, petra rinn brema  
pe vont d'ar gear pe choum ama.  
Mar d-ann d'ar gear gwelet e vinn  
Mar d-ann d'ar stank beuzet e vinn.  
Kelen oc'h Doue a c'houlennaz  
Ali an diaoul a gemeraz  
er stang war he fenn en em daclaz.  
Kenta a loa dre eno eat abiou  
oa mestr chaseer ann aotrou  
- Aotrou Gludonou, ne ouzoc'h ket,  
er stang ez euz eur plac'h beuzet.  
Na dioc'h he boutou hag he lerou  
Me gred eo Janned ar Riou.  
- Mar deo Janned ar Riou beuzet  
em bolz-me e vezo lekeet.  
An introun goz, mamm an aotrou  
a lavaraz d'he map Gludonou :  
- Hor bolz-ni ne vo ket digoret  
da lakaat merc'h tiek ebet.  
- Bezet droug e nep a garo  
hounnez em bolz-me a ielo.  
Ma zaimp hon daou enn eur besiad  
pa nomp ket bet enn eur guelead,  
ma zaimp hon daou enn eur bez doun  
Doue ra bardouno d'ann Anaoun.

vvvvvvv

28. ( UR GWALLER )

Nag ann Diaoul, ann esrouant  
a vez o tenti ann du iacuank  
d'ar giriegez<sup>o</sup> da bec'hi  
Me meuz eur plac'h, eur giniterv  
koanta plac'h a zo er c'hartier  
ha me eunn dervez dreist pep tra  
he fedi da zont d'am zi da leina.  
pa (oe)<sup>o</sup> debret hon repaz  
ha me krapsa enn he breac'h  
ha pignat ganthi d'an neac'h  
nedon ket eat mad er gramp  
na lirez dezhi va zantimant  
va zantimant pe deuz klevet  
Teir gwech d'an douar ez (eo) semplet  
ha goude pa ze dizemplet  
d'he zountoun e deuz lavaret :  
- O va Doue, ha possubl<sup>o</sup> e ve  
ve va c'henderv am disenorie!  
ha me pa'meuz he c'hlevet  
va mouchouer amez divisket  
hag enn he ginou meuz he lekeet  
Rak pam boa pec'het ganthi  
e sonjiz laza anezhi.  
ha me mont d'ar /jardin/<sup>o</sup> da doulls ann douar  
pedon o toulla e teuz form eun aneval  
henvel oc'h form eur c'hi;  
mennout a reaz dezhan va dibri.  
Kaer am boa her c'has kuit  
n'e dea ket diouzin  
setu ma oen oblijet da grial  
ann amezais oc'h va c'hlevet  
raktal<sup>o</sup> d'ar jardin a zo deuet  
ha va zorfed zo anavezet.  
meuz ez ounn bet barnet  
da veza va esker<sup>o</sup>brusunet  
gant taolioù houarn ha barren.  
Me ho suppli, tud iacuank me ho ped,  
pa viot gant an diaoul tentet,  
da bedi Doue hag ar werc'hez  
da dec'het dioc'h gwall gompagnnez

<sup>o</sup> = occasion

<sup>o</sup> Un dra bennak evel  
hou a lenner goude pa

<sup>o</sup>a-us : red

<sup>o</sup>a-us: liorz  
raktal

<sup>o</sup> skrivet dre fazi :  
raktal

<sup>o</sup> esker (sic) eme  
Ollivier



( Notenn : Aes eo merzout e lenne Ollivier ESKERN. Aes awalc'h e vefed aviz gantañ. Rak c'hoarvezout a ra gant Milin amañ hag ahont ober faziou: uheloc'h hon eus kavet raklat evit raktal. Met Gonideg 1821 en deus 14 linenn war ar ger esker, diimplij hiziv an deiz d'an unander, emezañ, anavezet hepken en niver daou : diou esker, div esker, divesker... Kenderc'hel a ra avat, " dans la construction d'un navire esker est ce que les charpentiers français nomment genou, et que les Gaulois apparemment nommaient jambe. ESKER DOUN, genou de fond,... ESKER KIL genou de revers..." Pa soñjer en deus renet Milin e vuhez e Brest e-touez ar vrezhonegerien a laboure war dro ar porzh hag al listri, n'eur ket re souezhet en defe kavet ar ger-se en implij en unan eus ar c'hanaouennoù das-tumet gantañ. Pa soñjer ouzhpenn e kaver e Barzaz Breiz p.99 :

En dro d'he ziousker dren daou skoulm all e c'hell bezañ oa anavezet c'hoazh ar ger en e furm di-gevrennek : esker, sker (?). )

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

29. (AR BREUR HAG AR C'HOAR)

- Debonjour tud an ti-man,  
ar vinorez peleac'h eman ?
- Mar deo va merc'hed a glasket,  
pignet d'an neac'h hag ho c'hafet :  
darn zo o skriva, darn zo o lenn,  
darn zo o c'hriat satin gwenn.
- Ne ket ho merc'hed a lavaran  
ar vinorez peleac'h emañ ?
- Mar deo ar vinorez a glasket,  
Katel eo ez e hanvet.  
Falla femelen a geret !  
ouz eunn habit d'am merc'hed  
e deuz teir pe beder freuzet  
er c'hoad gant he galanted.  
Lit aze gant ar venoden  
hag en em gafot gant al len
- bonjour dec'hu, plac'hik ann dour  
c'houi a zavon gwen hag a gann flour  
hag a rafe ganen-me ann amour.
- ne zaonan gwenn, ne gannann flour  
na ne rinn ganeoc'h hu ann amour.
- Sellet, plac'hik, oc'h penn va marc'h gwen,  
kaera brid arc'hant zo enn he benn.
- me ne rann forz euz ho marc'h gwenn  
ken nebeut hag euz ann dour zo el len.
- Sellet plac'hik, oc'h va c'hontrou  
peger brao eo gantho va boutou.  
List ho tillad ta, plac'hik flour,  
ho kolvez da vont gant ann dour,  
deuit ama ganen er c'hoad  
c'houi a c'hounezoc arc'hant mad.
- Ne lezann va dillad enn abandoun  
na va golvez da vont gant ann dour  
na ne din ganeoc'h er c'hoad  
na ne c'hounezin arc'hant mad.  
Me meuz eur breurik a bell bro  
/ha/ ma klefe hennez ho komzo  
a lakafe ho koad da redek
- Mar hoc'h euz eur breurik a bell bro  
p'her gwelot c'houi en anavezo.
- Kaout a ra din pa her gwelinn

heb mar hen anavezin  
- Me eo ho preurik a bell bro  
zo deuet ama d'hoc'h apro°  
Da zegas deoc'h hoc'h argoulou.  
Kant mill malloz dar lesvammou  
a ro d'an dud gwall aliou.

° = amprou, amprouñ

vvvvvv

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

30. AR MORVAN KOZ

Tenval ann noz ha glao a ra  
eun ebad eo mont da nosvesia ( bis )

eun ebad eo mont da nosvesia  
deomp da di'r Morvan da genta

da laerez ar ialc'h hag an arc'hant  
hag Annaik Morvan a zo plac'h koant.

- Lavar din me, va faotrik biban,  
hag hen-ma 'n hent da di'r Morvan ?

- eet bepred eun gant ar vali  
hag e tigwezot gant ann ti.

e ti'r Morvan koz pint erruet  
tri daol war ann noz ho deuz skoet.

Annaik Morvan pe deuz klevet  
da brenest he c'hramp zo dilammet.

- va mam choumit etal ho tan  
pe e vezimp lazet holl gwitibunan.

Rak ne deo ket evit ober vad  
int deut pevarzek en eur bagad

- digorit ann or, va magerez,  
me zo bet enn ho ti aliez

Me zo bet aliez enn ho ti  
o tibri va boued dizoursi.

o tibri bara gwiniz ha leaz dien  
/hag/ ar pez a garen da c'houlenn.

- leveret pep hini pez a garo  
'n or d'am map mager me zigoro.

E ti'r Morvan koz paz int erruet  
debonjour ho deuz lavaret.

- De bonjour ha joa enn ti man,  
Annaik ar Morvan peleac'h eman ?

- Ma eat dar foar da Vrenniliz<sup>o</sup>      ° E kanton Pleiben  
da breña eunn habit dioc'h he diviz,

da breña'n habit du voulouzet;  
warben<sup>o</sup> diziou genta he eured      ° = a-benn

warbenn diziou genta he eured.  
c'houi tud chentil ar c'henta pedet.

Kemerit skabel da azeza  
peadra a zo evit koania.

- Na ne deo ket evit klask hor c'hoan  
omp deut enn noz man da di'r Morvan.

da laerez ar ialc'h hag ann arc'hant  
hag Annaik Morvan zo eur plac'h koant.

- Setu ann alo'housiou, klasket hi  
ha list he buez gant tud ann ti.

dreist holl gant va map ker kloarek  
zo nevez deuet euz a Naonet.

N'oa ket he c'her peurachuet  
ar vagerez koz a zo lazet.

enn eur gramp eno etal an tan  
edo kuzet Annaik ar Morvan.

ha pe deuz klevet laza he mamm  
zo deut anezi gant esplamm.

- Annaik Morvan, ha red e ve  
ez aez te gwerc'h azirak Doue ?

- ha pa rannkenn mervel goulskoude  
me ielo gwerc'h a zirak Doue.

n'oa ket he ger peurechuet  
Annaik ar Morvan a zo lazet.

- debonjour d'id<sup>o</sup>, Kloarek Morvan, °a-us : te  
te hon anavez holl gwitibunan.

- Me ne anavezann hini ac'hoc'h c'houi<sup>o</sup>      °Komp.; ac'h  
nemet hoc'h-hu, Kloarek ar Muzi.      hoc'h-c'hwi,  
brezh.komzet

nemet hoc'h-hu, Kloarek ar Muzi,  
hoc'h euz va dalc'het da vadezi.

O va Doue, ha red e ve  
eo va faercun-me am lasfe.

- Me a wel digor kornik ann or  
savete da vuez, va fillor.

Mez eunn ozac'h koz a oa enn ti  
pini oe penn kaoz a walheuri.

- Mar chom e vuez gant kloareg Morvan  
hon diskuillo holl gwitibunan.

mar lezomp Kloarek Morvan da veva  
a lakai krenn hon dibenna.

N'oa ket he c'her peurechuet  
eunn dag enn he galoun zo plantet

pa blanten va c'hleze enn he galoun  
e lavare : aïou, va faercun !

ha pe flanten ennan bete'r groaz  
e lavare: houman ar gloaz.

Oh Introun Varia a greiz Ker  
Ra zigasi ar Morvan koz d'ar ger

Na da lakaat enterri he dud  
a zo lazet evel chatal mud

N'oa ket he c'her peurechuet  
n'oa ar Morvan koz er ger arruet.

- Kloarek ar Muzi, lavar d'in me  
peleac'h c'heuz-te enterret va zud-me ?

- Va magerez koz a zo er zal  
ha ne d-ema ket doun enn douar,

ha ne dema ket doun enn douar  
dre ma ne gavenn ket ar bal.

Annaik Morvan zo er jardin  
ha dindan eur boket Romarin.

rag er bern teil e tal ann or  
siouaz! eo anterret va fillor.

na dre ma toullen dindan han°  
e save ato he v'raac'h war gorre.

- Kloarek ar Muzi, din leverit  
perak euz ar vro-man e diit.

- euz ar vro n'hellan ket monet  
rag ann anaoun paour zo o viret.

Pa zonzann mont enn tu all d'ar mor  
e vez o viret dourn va fillor.

vvvvvvv

°a-us: dezhan he vez

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

31. SAINT JULIAN

( Ar c'hemmoù notennet war tu dehoù ar bajenn a zo diwar  
ur follenn distag o tiskouez testenn ha troidigezh )

Didostait holl gwitibunan  
da glevet gwerz sant Julian  
er c'hoad eo eat hep ged a var d'ar c'hoad eo st hep ked a  
evit monet da chasaeal var  
ebarz er c'hoad paz eo antreet /hep ged a var eo eat d'ar  
eul loenik rouz en deuz gwelet c'hoad/  
-Loenik rouz, lavar din me hep dale e teuo d'ar gear  
perak ec'h heuillez ac'hanoun /evit mont da hersal ar  
-me ? c'had/

ha va buhez a fell did-te ?

- Julianik te a lazo  
da dad ha da vamm enn eunn dro  
p'ho c'havi ho daou kousket mad  
p'ho c'havi ho daou enn eur gwelead.

° va bro  
° kent

-Me guitafe kentoc'h ar vro°  
d'ober pinijen evito,  
me guitafe kentoc'h° ar vro-ma  
eget n'aotrefen ho laza.  
Julian war he c'hiz a zo deuet  
dioc'h den ha dud en deuz ki-  
miadet

ha dioc'h den n'en deuz  
kimiadet  
dioc'h den ebed ne gimiaz

dioc'h den he dud ne gimiaz  
hag a bell bro hen a leaz.  
Kement o vale en deuz greet  
gant eur maner ez eo erruet

Bale kemend en deuz greet  
m'eo gant eur maner digwe-  
get

eunn dimezel°gaer en deuz gwelet  
-Dre ma teuit ha dre ma zit

° 'nn dimezel  
a beleac'h 'teuit beleac'h  
ez it

den iacouank, din-me livirit ?  
- Demeuz ar gear e tistroan  
n'ouzoun war zouar beleac'h ez ann.  
- Den iacouank, deut-ma° gansen-me  
da ober skol d'ar vugale  
ha da gabiten enn arme.  
Julian zo eat° euz ar gear

° ta  
a zo ect

he dad, he vam deuz dezhan gla- c'har  
 Klask a reont ho map dianket  
 Julianik ez eo harvet.  
 Kemend a vale ho deuz greet  
 gant eur maner ez int erruet

he dad, he vamm ho deuz  
 glac'har  
 bale kemend ho deuz greet  
 m'int gant eur maner digwe-  
 zet

hag° eunn introun gaer ho deuz  
 gwelet  
 - a beleac'h e teuit, da belec'ho  
 ez it  
 daou zenik koz din livirit.  
 - Demeuz ar gear e tistoomp  
 ha° n'ouzomp war zouar peleac'h ez  
 comp  
 o klask hor map a° zo dianket  
 Julianik ez eo harvet.  
 - Hervez m'ho klevann o laret  
 Ho map Julian a° zo va fried.  
 Daou zenik koz deut ganen dam zi  
 ne vezo ket pell ec'h errui  
 d'ar c'hoad eo eat hep ged° a var  
 ne vezo ket pell e teui°d'ar gear  
 Julian d'ar gear pa zao deuet  
 da gaout ar gwele° war eeun eo eet  
 e sonje duzhan parfeta<sup>99</sup>mant  
 oa gant he bried eunn den mechant  
 eunn den fallakr gant he  
 bried

o - hag  
 o pe leac'h ez it  
 o - ha  
 o - a  
 o - a  
 o eet hep ked  
 o hep dale e teui°  
 o he wele A<sup>99</sup>/<sub>20</sub>  
 o kredi oa enghan kousket  
 eunn den fallakr gant he  
 bried

o + hag  
 o hor gwele zo kousket  
 o - a  
 o laret  
 o + dindan al linen :  
 ho daou kousket enn eur  
 gwelead  
 o - biskoaz  
 na pa za unan ez ai daou

he gleze noaz a zic'hounaz  
 o he dad he vamm a lazaz  
 - Va fried paour, din leveret  
 piou enn ho kwele ho poa lekeet°?  
 - Tad ha mamm did-te, Julian  
 ha d'in-me ivez va-unan,  
 deut d'hor gwelet gant kalz a boan.  
 - ho, introun Varia ann Dreinded  
 lavar ar c'haro a° zo digwezot.  
 Ar c'haro en doa din lavaret° mad  
 e lasjenn va mam ha va zad  
 p'ho c'havjenn ho daou kousket mad°  
 ho daou kousket enn eur  
 gwelead  
 o - biskoaz  
 na pa za unan ez ai daou

Me ia brema da zant Jermen  
 euz al leac'h biskoaz° ne zistroaz den  
 - Ha pa zai unan ez aimp hon daou  
 ne meuz ket a samant da vadou.  
 gourc'hemennet ez eo gant Doue  
 d'ann eil pried heuilla egile.

vvvvvvvvvvvv

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

32. LAEROUN PLUFUR°

° Plufur etre Tremel ha  
Larveleg

Tri den a barous Plufur  
 ganet ho zri dre eur gwal natur  
 Ann Olier, Gion Gere  
 he gamarad Fanch ar C'halve  
 ha map ar Mazer a Blunek°  
 ho fevar int kamaraded  
 eur zul goude goude ann ofern bred  
 da leina ez int en em assinet,  
 ez int en em assinet da leina  
 evit gout peleac'h mont da goania.  
 Ma enn deuz lavaret unan :  
 - deomp da vereuri Kermorvan  
 Deomp da vereuri Kermorvan  
 ac'hane hor be gwerz hor c'hoan.  
 E Kermorvan pint erruet  
 etrezho divizou zo savet,  
 savet diviz/ou° etrezho  
 vit gout pini a antreje  
 Gion Gere ann hardia  
 hen-nez antreo da genta  
 hag a rai° d'ar c'hrek donet gant mall  
 da zigeri 'n or d'ann tri all.  
 Gion Gere a lavare  
 e Kermorvan hag enn noz-se :  
 - Klasket eur skeul, ama red he  
 ma toullimp 'n doen da vont warnhe  
 ebarz enn ti pa oent antreet  
 eur fasad d'ar wreg en deuz roet  
 ha na eureu dei donet gant mall  
 da zigeri 'n or d'an tri all.  
 pa zint ho fevar antreet  
 gant kerdign deuz he /amarret/  
 gant kerdign 'deuz staget ane  
 an eil den koz /deuz/  
 egile.  
 Gion Gere a lavare,  
 meaz a Gervorvan pa /sortie/  
 - Prim war va c'hiz me a drofe  
 hag a c'housfe ann tan warnhe.  
 Ian ar C'halve a lavare  
 da Gion Gere nag enn noz-se :  
 - tao lez te p'int mad va mignoun  
 e vez-te ker c'hreiz a galoun

° (= Pluzuned, distaget  
Pluned )  
 ° a-us : zo  
 ° a rai  
 ° staget  
 ° a-us : ouz  
 ° a-us : z'ee  
 ° respountaz

evit tanet ne vesfont ket  
a-walc'h eo d'he beza laeret.  
Eunn den chentil voa er c'houtre  
eunn den nobl a galite  
a oa en de warlerc'h mintin mad  
evit mont da chaseal er c'hoad.  
Ebarz er c'hoad pa eo antreet  
tal ar vereuri pe'n em gavet,  
meurbed en em gav souezet  
'walet digor ann orojoz  
ha n'oa kristen tro-war-dro.  
Ebarz enn ti p'eo antreet  
da c'houeza tan en em lakeet,  
da c'houeza tan, d'allumi goulo  
da c'hout petra a oa enc.  
Ar goulou pen deuz allumet  
daou zenik koz en deuz kavet :  
- Daou zenik koz d'in-me leveret  
petra ganshoc'h zo errued.  
- Traou 'walc'h ganemp zo erruet :  
al laeroun warnomp a zo bet.  
- Daou zenik koz, d'in me leveret  
ha c'houi arveit hini an-he  
- Me ne arveann hini an-he  
nemet al laer Gion Gere  
hag he gamarad Fanch ar C'halve.  
'n aotrou Gerlavar pen deuz klevet  
da skriva ec'h en em lekeet,  
da skriva ec'h en em lekeet  
d'ober d'an archerien em gavet.  
- 'n aotrou Gerlavar a vonjoure  
e Bourg Plunek pa ziskenne :  
- hostizez, din-me leveret,  
eunn noz ha ni a ve lojet ?  
- Komodite vraz a zo em zi  
evit eunn nozvez d'ho repui.  
Logerien hirio n'em euz ket me  
nemed al laer Gion Gere.

nemed al laer Gion Gere  
he gamarad Fanch ar C'halve.  
'n aotrou Gerlavar vel m'en deuz klevet  
he zourn d'he c'hodel en deuz riklet.  
- Dalet, hostizez, eur pez daou skoed  
marde 'r wirionez a laeret.  
Marde ar wirionez a laeret  
hag /ar voien/° d'en kemeret.  
P'ho devez debret mad ho fred  
hag ingaveuret ho c'hezek,

° a-us: an tu vad

hag ingaveuret ho c'hezek,  
ac'hane ez int partiet° ° a-us : eet  
pa cant gant ann hent o vonet  
ann Olier ho deuz rankontret,  
o rankontret ann Olier  
o vont gant eunn ijen d'ar c'higer  
ha men deuz lavaret unan an-he :  
- Setu ann Olier aze,  
setu aze ann Olier  
o vont gant eun ijen d'ar c'higer  
Ann archerien vel m'ho deuz klevet  
diwar ho c'hezek int diskenet,  
diwar ho c'hezek int diskenet,  
Ann Olier o deuz kemeret.  
- Brema p'hoc'h ho tri aze amarret  
Map ar Mazer pelec'h vo kavet ?  
- e Plouber pe e Tonkedok  
pe er Ginkiz Vraz e Plunek  
Ann aotrou Gerlavar a vonjoure  
'barz enn Bourg Plunek pa ziskenne :  
- hostizez deomp-ni leveret  
eunn nozvez ha ni a ve lojet ?  
- Komodite vraz a zo em zi  
evit eunn nozvez d'ho repui.  
Logerien hirio me n'am euz ket  
nemet map ar Mazer euz (a) Plunek.  
'n aotrou Gerlavar vel men deuz klevet  
he zourn en he c'hodel en deuz riklet :  
- Dalet, hostizez, eur pes daou skoed  
mar deo ar virionez a laeret  
hag ar voien d'hen kemeret.  
P'ho devez debret mad ho fred  
hag ingaveuret ho c'hezek  
hag ingaveuret ho c'hezek,  
ac'hane 'z ejont efe da noz° ° Komp.: e fed an noz  
da brizoun Roazoun da repoz.  
Ann Olier a lavare  
er vaz huella skeul pa bigne :  
- Introun Varia ann Dreinded,  
me ia d'ar maro hep sujet.  
biskoaz netra n'em euz laeret  
'met eun ijen briz pewar zroad gwenn  
a laka ar gorden em c'herc'hen.  
Pedit eta, va mignouned,  
he daolet d'an traon pa geret.  
Map ar Mazer a lavare  
er vaz huella skeul pa bigne :  
- Introun Varia a Groiz Ker,  
besit truezus em c'hever.

pa cann enn oad a zaouzek vloaz  
e fellaz d'am zad va c'horrija.  
Va zad a choum war he wele klan  
me c'houezaz ann tan warnezhann,  
me c'houezaz ann tan e ti va zad  
pa ne gare ann ankou he c'hoantaat,  
c'houeza ann tan e plouz e wele  
hag hen devi hen beo buhe.  
Pedit evit han, ma mignouned  
he daolet d'ann traon pa geret.  
Gion Gere a lavare  
e vaz huela 'r skeul he c'houde :  
- Introun Varia a Greiz Ker  
bezit trugarezuz em c'hever.  
Etre Montroulez ha Gwened  
me eureu ma c'henta torfed.  
Me 'zizoloaz triwac'h pignoun  
O va Jezuz, pebez estoun !  
ken a lare tud ar c'hontre :  
- hema zo tan aberz Doue.  
Etre Mountroulez ha Gwened  
Triwac'h grek wravez en doa lazet  
vit goud ann action gant-he  
penaoz e tougent ho bugale.  
- Pedit evithan, va mignouned,  
he daolet d'an traon pa geret.  
Fanch ar C'halve a lavare  
er vaz huela ar skeul he c'houde :  
- Introun Varia a Greizker,  
Bezit trugarezuz em c'hever,  
pa oan er gear e ti va zad  
me eureu d'am mamm tiegez mad.  
Va mamm ha laret d'in eunn de :  
- va map, te zo eur bugel ker  
pa n'hellez kavet eur ciboer;  
eur ciboer a dlefez da gavet  
da lakat aman pa ve sallet.  
Hag hen o vonet da iliz Plougano.  
Pa erruaz noa den war dro.  
Hag hen o vont prountamant,  
digeri arbel ar Zakramant.  
Eur vouez euz ann env en deuz klevet,  
da Fanch KAlve he deuz laret :  
- Aze, Mignoun, nec'h euz ket great mad  
pa ne da zaouarn daouarn zakr.  
pa zea eur pennad dicuz ker  
hag hen o tigeri ar ciboer  
a voa ennhan triwac'h hosti

a zebraz holl d'he zijuni.  
Ne glemman den deuz ma c'hontre  
na kennebeut deuz va ligne  
nemed Map ar Briz° deuz °° Plouber °/Mazer/ °° a-us : a  
garfenn 've ama em c'hever.  
Hennez a laras d'in eunn de  
klask dezhan eur bugel divade,  
klask dezhan eur bugel divade  
e teskje dezhan traou°neve ° a-is : ardou  
ha me mont war hent braz Keraz  
a rankontriz eunn dougerez,  
e rankontriz eunn dougere  
o tont deuz ofern ar beure.  
- Dougerez din-me leveret  
pe oad ar bugel a zouget ?  
- e tro eur seiz miz hanter  
ha ne ket achu he amzer.  
hag hen tenna he gountel asten  
ha trouc'ha ar plac'h rez he banden  
ha tenna diout hi eur map,  
eur bugel kaer evit he oad.  
pa erruaz gant han e Plouber  
n'oa ket map ar Briz er ger,  
n'edo ket er ger map ar Briz  
ha teleur anezhan enn eur parkad drez  
Kriz vije 'r galoun a glevje  
biou ar parkad drez nep a dremenje  
o klevet ar bugel o krial hep paoue  
o c'houlenn badiziant d'he ene.  
p'erruaz mab ar Briz er ger  
e oe diframmet ar bugel,  
e oe diframmet ar bugel  
ha desket dezhan traou neve  
da vale hardi enn pep kountre.  
- Pedit evithan, ma mignounet,  
he daolet d'an traon pa geret.

vvvvv

33. KARANN AR BRIZ

Karan ar Briz eo a ouele  
ne gave den her frealze  
nemed he baeroun hennhez a ree.  
Karan ar Briz eo a ouele  
an nor war he vam pa zigore :  
- Tavit, va mamm, na ouelit ket  
o tenna d'ar billet ez ounn bet  
ann hini du am euz tennet.  
- Tao, Karan ar Briz, na ouel ket.  
unan bennak a rank monet.  
- Me ne rajen forz evit partia  
panefe va mam a zo klanv,  
zo seiz vloaz zo war he gwele  
ha ne deuz nemet ounn-me.

- ha kea 'ta, kea, Karan ar Briz  
pa zai da gorf gant ar roue  
ra zai da ene gant Doue.  
- Dalit, aotrou persoun 'n alc'housesiou  
it va welet va mam avesiou.  
- Laka da alc'housesiou e leac'h ma kiri  
me a iel teir gwech bemdez da ti.  
- Aotrou sant Karann, va faeroun,  
grit eur burzud bennak evid oun.  
Lakit ar c'hleier da zini flam<sup>e</sup>  
pa vo va mam enn he zremenvan.

\*a-us : splan

-----  
Karan ar Briz a lavare  
d'he gabiten eunn deiz a oe :  
- Me glev kleier va bro o soun splan  
va mamm baour zo enn he zremenvan.  
- Ho ne ket gwir a leverez te  
re bell emacoud dicouthe;  
'macout pemp kant leo dioc'h da vro.  
- Taolit ho troad war va hini  
hag e klefot anezho o sind.  
Ar c'habiten a lavare  
da Garann ar Briz enn deiz-se :  
- Skriva e gonje d'ann den man  
maz ai da velet he vam zo klan.



Karann ar Briz a c'houlenne  
 enn he vro na pa zigweze :  
 - Petra zo nevez er bourg-man  
 ma soun ar c'hleier evel 'maro.  
 - Daou viz hanter a vo 'hep dale  
 ma 'ma ar c'hleier war vole  
 ma sounont noz deiz evelse.  
 Karann ar Briz a c'houlenne  
 oc'h ann aotrou Persoun enn deiz-se :  
 - aotrou persoun, ann alc'housio  
 maz inn da velet va mam zo maro.  
 - Ne deo ket gwir a leverez  
 da vam a zo c'hoaz e buez.  
 emoun o tont euz he gwelet  
 ne deo ket abaoe marvet.  
 Karann ar Briz eo a ouele  
 ann or war e vamm pa zigore.  
 Daou bok d'he vam en deuz roet  
 he galoun dre 'n hanter zo rannet.  
 Goude 'n daou'poket dezhi  
 ce tennet he vam war al leur zi.  
 Ar Werc'hez ha santez Anna  
 a oa ho diou oc'h he liana.

°a-us : m'en doe

vvvvvvvvvv

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

34. AR C'HAKOUZ

( Ar c'hemmoù degaset war tu dehoù ar bajenn a zo diwar ur  
 c'harnedig, 16 1/2 X 11 1/2, 17 folleñn baper tev, goloet  
 gant parch, a zo ennañ brouilhedoù mojennoù, krennlavarioù,  
 notennoù war ar brezhoneg, hag e kreiz ur c'han pobl, unan  
 hepken : Ar c'hakouz. En diabarzh ar golo e lennar ivez ar  
 gerioù-mañ skrivet a golonenn : 1 ère Section. Olier fran-  
 cois. Uguen. Floch olivier. Abautret. Kerlere. Troadec yves.  
 An anioù-mañ a vez adkavet e lec'h pe lec'h eus dornskri-  
 doù Milin stag ouzh ar c'hontadennoù bet dastumet gantañ.  
 Da grediñ a zo eo an hevelep paotred o deus kanet dezhañ  
 tra pe dra eus ar gwerzioù ha sonioù en deus eilskrivet. Ar  
 c'harnedig a zo perc'hennet gant M. Glanndour. )

P'edeno vont da gerc'hat dour  
 ne ouienn° em oa eur gwir amour ° c'houienn

hag hen ha mont ha laret d'in :  
 - Plac'hik, ha c'houi zimesfe d'in ?

- Ne deo ket° vel hen war ann hentchou °Ne ket  
 e vez great ann dimeziou. bars ann iliz /eo/ pe er vered  
 eo ivez an holl dimezet (1)  
 ° a sirak

dirak° eur belek pe zaou  
 gant pevar c'hoaz da destaou.

Abenn pemzek dez goude ze  
 oann dimezet d'ann aotrou ze.

d'ann aotrou pa ouñ° dimezet ° oenn  
 d'he vro ganthan ez ouñn eet

pa oan eat°ostik d'he di ° eet  
 me a gleve° trouz ar c'hixri ° ha me klevet

ha me ° goulenn diout han : ° + a  
 - Kakouzeri a zo aman ? ° + ha

hag hen monet ° distrei ouzin ° + ha  
 ha rei diou javedad d'in.

- Dalit, va mestres, ho telou mad° ° = deroh-mat. ( Furm  
 Dont d'ober kakous eus va zad. G. Milin a gleven "pa  
 oan bihan er gêr". Abs-  
 onen. )

dont d'ober kakouz euz va zad  
ha me zo° map d'eunn°° ozac'h mad.

Kenta ma ziz d'ar gakouzeri  
me ne ouienn° ket trei ar c'hirri

brema me ho zro hag ho distro  
koulz ha merc'h kakouz zo er vro.

Ma karje° va mam ha va zad  
beza va dimezet p'edon° enn oad

Ne vijen ket bet° stal ann tan  
o /vailluri/° eur c'hakouz bihan

Ne vije bet dimezet mad  
d'eur paotr iacuank e ti va zad,

d'eur paotr iacuank e ti va zad :  
n'em bije ket gant han kalounad.

° - zo °° da eunn

° c'houienn

° karche  
° pedounn

° Ne vijenn brema  
° a-us hag er c'har-  
medig : lurenna

vvvvvvvv

(1) Ar poz-mañ a zo bet dilezet gant Milin p'en deus eilskri-  
vet ar son, o vezañ na gomprens ket ar gerioù :... pe er ve-  
red eo ivez an holl dimezet. Ha koulskoude eo c'hoazh un tes-  
teni eus an hengounioù degaset gant ar c'hanaouennoù-pobl...  
Rak betek fin ar Grenn-amzer pe war dro, ret e vije resisaat  
evit Breizh, ne veze ket graet an euredoù en diabarzh an iliz  
met er porched, ha neuze e ranke ul lodenn vras eus an dud  
chom er vered. N'eus forzh penaos ne veze ket degemeret an  
dud e lein an iliz, nebeutoc'h c'hoazh er c'heur. Evit ar  
pezh a sell an testoù, ne c'houlennet hizio nemet daou, ho-  
gen e Statuts et réglemens du diocèse de Quimper, publiés au  
Synode général en 1710 et réimprimés par ordre de Monseigneur  
l'Evêque en 1786, a Quimper, chez Yves-Jean-L. Derrien, e  
lennan p.94-95, e veze goulennet bepred pevar dest, daoust  
d'ar Ritual latin embannet e 1722 evit an hevelep eskopti,  
komz eus tri pe daou dest hepken. Met ne ra moarvat ar Ri-  
tual nemet adembann hep kemmadur ar Ritual Roman gourc'heme-  
nnet gant Paol V e 1614, e-pad ma vire ar Statutoù boazioù  
kozh an eskopti. ( Notenn gant M.G. )

Koñveriañ Penwern niv. 414 : Ar c'hakous.

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

35. KLOAREK ROSKO

Eur menik glaz zo e penn va zi  
d'ar gloer iacuank da studi.  
trioec'h douz kloarek am euz bet  
hag ho zricuac'h int beleget.  
Philip Olier, ann diveza,  
a laka va c'haloun da ranna.

Philip Olier ma n'em c'harjac'h  
enn ho kaloun nag en nep leac'h  
Pa zea philip Olier d'an urzou  
/ec'h azez Janned/° war he zreuzou.  
na da ourla mouchouerou  
hag evit sec'ha he daelou :  
- Philip Olier, distroit° enn dro  
beleien a-walc'h a zo er vro.

° a-is: Janned azez

° a-us: e tistrofac'h

Philip Olier a zo beleget  
va c'haloun keaz a zo rannet.  
- Philip Olier ma n'em c'harjac'h  
enn ho kaloun nag e nep leac'h,  
ne lakafac'h ket va mouchouer  
da c'holei ar c'halir war ann aoter.  
- Ne ket fae warnoc'h, Janned, a rann,  
da zervicha Doue her lakaan,  
da zervicha Doue hag ann dreinded  
da c'holei ar c'halir benniget.  
Azalek ann aoter betek ann or zal  
klever kaloun Janned o strakal,  
o velet he muia karet  
o vont da laret ann ofern bred.  
pa zea Philip Olier tro ann iliz  
e krog Janned enn he zoupiliz.  
- Philip Olier, distroit ouzin  
pec'hi a rid abalamour d'in.  
- Ma karjac'h, Jannet, beza lavaret  
e vije ho kaloun rannet  
vijenn eat da Roum da zisakri  
evit dont d'ar gear d'hoc'h eureuji.  
Na pedo o tont war ann hent bras



enn eunn dra all° ne larann ket  
enn eun dra all° m'ho sikouro  
hep damant d'am c'horf, d'am mado.

° a-us : eur c'hiz  
° a-us : eur c'hiz

z-ann da di va merc'h Enori.  
penaoz kredinn-me mont d'hezi  
Biskoaz vad m'euz graet dezhi  
nemet he c'has er meaz va zi  
Lammet he mado diganthe

- Bonjour d'hoc'h va merc'h Enori  
deuet ounn d'ho kwelet d'ho ti,  
pa ne deuit ket d'am hini  
- Ha dehoc'h 'émezhi, va zad Roue,  
petra eo ar c'helou neve ?

- Me zo poaniet gant ar c'hlenved  
hag e lavar an doktoret  
gant eur vronn werc'h em be iec'hed  
digant unan euz va merc'hed.

- Na pa ve skuilla va holl goad  
'vidoc'h, va zad me rai peb vad  
it 'ta aze war ho taoulin  
va bruched d'hoc'h a zizoloinn.  
N'oa ket he bruched dizoloet,  
he bronn gant eunn aer zo eet.

-----  
Enori eno a ouele  
ha den ebed n he frealze  
'met he zad roue a ree.  
Hen a lare dezhi bepred :  
- Tavit, va merc'h, na ouelit ket,  
me wel eunn eal tont d'ho kavet  
enn he zourn ganthan eur vronn skler  
a vezo d'hoc'h da vizilouer.  
Brema, Enori, m'ho timezo  
da gaera map a zo er vro,  
da gaera map vezo kavet  
vit ar wella euz va merc'hed.

-----  
Demezet oa hag eursujet  
bet eur pennad gant he fried  
ken zeu he mamm gaer da laret :

( Guerz Santez Enori )

- va map te a zoug eur bonned.

- Tavit, va mamm, na lirit ket.  
eur werc'h a zoare ameuz bet,  
eur werc'h a zoare ameuz bet  
den 'bet ganthe n'hoc'h euz gwelet.

-den 'bet er gamp n'am euz gwelet  
er solier ne lavarann ket.

- Bonjour dehoc'h, va zad-kaer Roue,  
ha dehoc'h, va map Guezo, ive.  
petra eo ar c'helou neve ?  
- petra rafac'h, din leveret,  
d'eur c'hrek he deje daou bried ?  
- Barn 'nezhi da veza krouget  
pe d'an tan da veza devet  
he barn /da veza devet en tan/° ° a-us : na da zevi enn  
hennez zo eur maro buhan. tan

- M'ho pe gwezet, n'ho pe laret.  
Enori eo hoc'h euz barnet.  
- Mar deo Enori m'euz barnet  
eur barn neve a vezo gret.  
Ober dezhi un donel neve  
he leuskel er mor, enn han Doue !  
Guezo eun deiz a c'houlenne  
oc'h merdaidi seis vloaz goude.  
- Merdaidi, din leveret,  
n'hoc'h euz gwelet tonel ebed ?  
- Klasket neb en devez kollat.  
n'hon euz gwulet tonel ebet  
'met tonel santez Enori  
a zo diskennet er Merdri.  
Ni ia bemdez d'he saludi.

-----  
Santez Enori a ouele  
ha n'oa den he frealze  
met he map hennez a ree  
hennez a lavare bepred :  
- Tavit, va mamm, na ouelit ket  
'ma erru va zad d'ho kwelet,  
erru d'ho kaout, d'ho klask d'ho ti  
ha da vont ganthan d'he hini.  
- Penaoz anavezet da dad ?  
N'ec'h euz gwelet he zaoulagad.

- Bonjour, Enori, va fried  
c'houi 'glaskan dre pep bro er bed  
Setu me deut d'ho kaout d'ho ti  
da c'hout ha c'houi deui d'am hini.  
Abaoue m'omp hon daou kwiteet  
kalz gwall-heuriou zo c'hoarvezet,  
va manerieu zo diskaret,  
ar gwez emm dro zo displantet,  
va mam gant ann diaoul zo eet  
/Mar karje oa kuit/° a gement-se ° a-us; kuit vije bet  
beza laret ar virione.  
Setu gwerz santez Enori  
nep n'he gear ket sonjet enghi.

vvvvvvvvvv

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

37. KURE LOKIREK

Dar sul bleunioù dioc'h ar beure  
pa zavaz ann aotrou kure  
na zanje ket varvje enn deis-se.  
pa zeo savet, pa zeo gwisket  
da gas ar sakramant eo et  
da gas ar sakramant affo  
da gorn pella euz an drevo,  
d'eur vroeeg devot mar doa er vro,  
Anna Varvek oa he hano.  
pa zeo ebarz en ti eet  
ar sakramant en deuz lekeet  
war an daol tost d'Anna Varvek,  
da dal he gwele ez eo eet.  
- Bonjour, 'mezhan, Anna Varvek,  
setu deut Jezuz d'ho kwelet,  
deuet (eo) d'ho kwelet d'ho ti  
pa n'hellac'h ket mont d'he hini.  
N'eo ket deut he-unan ama :  
ar zent, ann elez zo gant ha,  
Anna Varvek, d'ho pisita.  
- Pebez gras hoc'h euz, aotrou Kure,  
pebez gras hoc'h euz digant Doue !  
dougen Jezuz war ho kaloun,  
sevel da greac'h huel Rostredour.  
- Goulennit pardoun 'ta oc'h Doue,  
kimiadit dioc'h ho pugale  
/rak neo ket houman hor bro/  
Sellit strezeg ann enno  
rak n'eo ket houman hor bro.  
Pa hen euz hi komuniet  
e tistro da iliz Lokirek  
da govez he benitantet,  
da c'hortoz laret 'nn ofern bred.  
Goude ma oe dek heur skoet  
da laret 'nn ofern bred eo et.  
n'en deuz hi ket peurlavaret.  
War ar respount eo bet kouezet.  
Sikour en devez goulennet  
digas anezhan er porched  
Darn a lare oa fatiket  
ha darn all ez oa marvet.

Marc oa, marvet war iun.  
 Biken er beg-ma ne zihun  
 Pebez kalounad d'he c'hoar ger,  
 a zo er presbital, er ger  
 o sira dezhan he voutou ler  
 evit mont goude lein da brezeg  
 vit mont da brezeg da Wimaek.

vvvvvv

Dornskridoù Milin : Kanacuennoù

38. ( MAC'HAID CHARLEZ )

- Ma karje ma zud-me Charlez  
 beza ma c'hastizet aliez,  
 ma c'hastizet gant eur fust prenn  
 ne vien eet da Goat-Trezen  
 da c'houtellat d'ar volerien.

Paziz me da genta d'ar c'hoad  
 me ne ouien tamm c'houtellat  
 neuz'ez iz e beg eur wezen  
 da c'houtellat d'ar volerien :  
 e teue triwac'h a vanden.

Na Charlez koz a lavare  
 d'he vere'h Mac'haid eun de a oe :  
 -ma merc'h Mac'haid, mar dud zo 'zeo ° Komp.: Mar dout  
 rekour d'as tad paour he vue aze  
 - Ma riye ma zad 'riye aze  
 dioc'h he vouez m'hen anaveje.  
 Mac'haid Charlez ne ouie ket  
 oa he zad paour ioa lazat ° a-is : n'oe ...  
 ken /oe dezhi/°anaout he vored anaveet  
 War benn darn euz ar forbanet.  
 Ken n'oe anaout he gontel lemm  
 war ann dol e Koat-ann-Drezen.  
 Mac'hait Charlez a lare  
 d'an aotrou C'hoar glaz 'nn deiz a voe :  
 -Aotrou C'hoar glaz, aze choumet  
 da laza pe da vea lazat.  
 - Me ne lazinn, ne vin lazat :  
 va fried a (zo) gwilioudet  
 d'ho klask da goumer cunn deuet.  
 - Na ma cefe ar forbanet  
 Aotrou 'r C'hoar C'hlaez o'houi ve lazat  
 deut-hu na war dalier va marc'h  
 m'ho tremeno sioulik awalc'h.  
 Aotrou'r C'hoar C'hlaez a lavare  
 enn ostaleri pa errue :  
 - diskennit gwin, ar gwin gwella  
 d'am c'houmer ha din da eva,  
 arc'hant am euz evit paea.  
 p'en devoe mesviet arzhi

aotrou 'r C'hoar C'hlaaz a c'houl digant hi :  
 - Mac'haid Charlez, din leveret  
 ped marc'hadour hoc'h euz lazet.  
 -/p'em euz/° ar maro m'euz da c'houzanvi °a-us: war  
 ne oufenn ket ho niveri.  
 Etre 'r Pontou ha Montroulez  
 euz eur c'head a zo leun a zrez.  
 Liesoc'h a gorf a zo ennan  
 vit e karnel ar barez man.  
 - Mac'hait Charlez, din leveret  
 pet krouadur hoc'h euz ganet ?  
 - Seiz am euz bet euz va fried  
 ha seiz all euz ar forbaned,  
 hini ane n'em euz badeet.  
 M'euz triouac'h dousen kontellou  
 a zo alacuret ho fennou,  
 hag ar falla euz anezhe  
 'Laze triouac'h deve ha deve.° ° Komp.: devezh  
 Meuz triouac'h dousen mouchoerou  
 ha kemend all euz a goefou  
 ha kemend all a° lien moan ° a-us : euz  
 biken anezho ne uzann.  
 Mac'haid Charlez a lavare  
 er vaz huela'r skeul pa bigne :  
 - Ma vie ganen va c'hountel vraz  
 m'oa da lazet aotrou'r C'hoar C'hlaaz  
 - Mac'hait Charlez, ne dec ket se :  
 Bezit preder euz hoc'h ene  
 'moc'h o vonet dirak Doue.

VVVVVVV

39. MORISET IANN SKOLAN

° E korn ar fellenn e  
lennet : Melrand

Gouelomp, gouelomp na gant galc'har  
 kemend den ° zo war ann douar °a-us : a  
 enn eur glevet eur seurt torfed  
 Krena 'rann oc'h he lavaret.  
 ebarz er Merant tremenet  
 e ze eur gwall-eur erruet  
 greet gant eur c'hoz ° tamm kemener °a-us: lakez  
 enn andred eur plac'h euz a ger.  
 Daou vloaz hanter ez oa bet  
 o klask he dougen d'ar pec'hed.  
 ar plac'h he doa doujanz Doue  
 hag acun da zaoni he ene.  
 Eunn deiz na zonje nemet mad  
 enn eur ziwalloened he zad °a-is : /p'edo o tiwall/  
 pa zigwez ann den fallakr-man  
 eur c'hrok poezet a oa gant han.  
 hag hen mont ha lazet d'ezhi :  
 - Bremaik avad ec'h aotrei  
 bremaik avad te a aotreo  
 pe ma ne rez ket me da lazo.  
 ar plac'h paour-man pa her c'hlevaz  
 o welet oa enn danjer braz  
 a bedaz ar Werc'hez Vari  
 da veza avokadez evit-hi.  
 - Gwerc'hez dreist ann holl gwerc'hezed,  
 n'am dilezit ket, me ho ped.  
 gwell eo gan-en beza lazet  
 evit ober drouk na pec'hed.  
 hag hen kregi 'nn he groumelen  
 Skei ganthi diwar greiz he fenn.  
 ann trede taol d'ezhi a roaz  
 diwar boull he c'haloun e skoaz  
 /hag enn/° he goad /holl/ he beuzas?° °a-is : gant  
 etre unneg heur ha kreiz de °°a-is: he sklabezaz  
 he zad er gear a zigweze  
 a gav he c'hrek, he vugale  
 e glac'har, e tristidige.  
 - Va bugale, din leveret  
 perak ez oc'h-hu glac'haret ?  
 - Va zad, abred awalc'h klafet

Siouaz! maro eo Moriset.  
 Morised a zo enn hent braz  
 enn eur poull goad hag hi ienn sklaz  
 ann ozac'h ° pa glevaz  
 war al leur-zi eno 'gouezaz,  
 da gaout he verc'h goude 'ieaz.  
 - harz war ar muntrex milliget  
 harz war ar muntrex kounnaret  
 petra deuz gret va merc'h did-te  
 evit ° d'he laza er c'hiz-se ?  
 Kris 'vije 'r galoun na ouelje  
 e parez Merand neb a vije  
 o welet 'r goad 'tont euz ar c'har  
 pa gaset Moriset d'ann douar.  
 eur groaz zo savet war he bez  
 da ziskouez eo maro gwe(r)c'hez  
 cunn all e leac'h moa bet lazat  
 evit beza skouer dar merc'hed.  
 Kemeromp eta skouer diout-hi  
 evit beza hevel out-hi.  
 hag eveld-hi vimp kurunet  
 er baradoz gant ann dreinded.  
 gwer(z) Moriset eo houman  
 da neb he goar da gana !

vvvvvvv

°a-us : na

°a-us : dout

Dornskridoù Milin : Karaouennoù

40. ( LAZER E WREK ) °

° Keñver. Penwern, Niv.  
 53 : Fio Chaffre  
 ( laher he greg )

- Lazit ho pried, me rai va hini  
 Maz aimp hon daou d'an Ormandi  
 na da zerc'hel hostaleuri  
 brava daou zenk e vemp ni.  
 Pa deu 'nn ozac'h euz 'nn ofern-bred  
 edo ar c'hrek war ann oaled  
 o lurenna he mab bihan.  
 rei a ra seiz taol kountel gamm,  
 hag he stlepel war leur ann ti.  
 - enn han' Doue, aiou! emezhi,  
 Kerc'hit ar c'hure d'am noui.  
 - Aotrou Kure, na (me) ho ped,  
 deuet gan-en da noui va greg.  
 - Na petra c'hoarvez gant da c'hrek?  
 edo dissul e-tro'r vered,  
 brava greg a heljet gwelet  
 - He zreid a zo harpet er skabel  
 hag eo kouezet war eur gontel.  
 - Petra zo 'nevez c'hoarvezet  
 m'ema er goad du poulladet ?  
 - va zroad zo harpet er skabel  
 hag ounn kouezet war eur gountel.  
 Eur c'hrouadur a ioa em ti  
 enn cad a zaou viz pe a dri :  
 - Aotrou Kure na gredit ket !  
 va zad eo en deuz he lazat.  
 - Te a zo din eur patrik mad  
 a ra abred krouga da dad.  
 te her lakai da luskella  
 ouz°ar gorden huella  
 Lazet da vam, krouget da dad  
 Doue ra bardouno ann Anaoun  
 emaint brema war ar vaskaon

°a-is : /oc'h/

( Traon ar bajenn 36 eil bann, ur poz teir gwerzenn  
 enn e bart e-unan : )  
 Ann neb he goar hag he c'hano  
 Kant dez pardoun a c'hounezo  
 hag hanter kant neb he zelaouo.



Dornskridoù Milin : Kanacuennoù

41. ( CHANSON GRET DA EUR C'HLOAREC HA D'E VREUR  
LABOURER, A ESCOPTI DOL ETAL SANT-MALO.  
An ano-mañ eo an hini roet d'an hevelep son,  
hervez J. Ollivier, e Dornskridoù Ledan, I,  
p. 254-261. )

Selaout hag e klefot hag e klefot kana  
eur zon zo kompozet a nevez er bloaz-ma  
great d'eur c'hloarek iaouank ha d'he vreur labourer  
ho deuz plantet eur rosen e ti eur Miliner  
ar re man loa dibreder, ho mamm, eunn intarvez  
ho c'hasas ° d'ar vilin goude koan eun nosvez °a-us:ho daou  
en eur lavaret dezho : - (d'ar) miliner (zo t)amall  
ann hanter ia ganthan euz a bep arreval.  
pa errujont er vilin e c'houlennjont mala:  
- mar plij ganehoc'h, miliner, heb ho tizoblija  
- peseurt, 'me ar miliner, a zo enn ho sac'hadou ?  
- lod anezho arreval, ar re all zo ed du.  
Pennerez ar miliner demeuz he c'hrek kenta  
'c'halvaz he zad enn ti, a lavaraz d'ezha :  
- 'n han' Doue, va zad, 'mezhi, pa walot ann ed du  
tennit danvez ar c'hrampoez dre ma kafot ho tu.  
- Allaz! va merc'h, emezhan, n'emezo bleud na brenn,  
ar c'hloarek zo el laou hag he vreur war ar genn  
- List ho, 'me ar bennerez, m'ho c'haso aless  
me zistago ho c'hezek hag ho losko da vale  
- ac'hanta, paotred iaouank, n'eo ket aze 'kavien e veac'h  
distaget eo ho kezek hag eet n'ouzon pelec'h.  
- List-ho em'ar c'hloarek, ne daint ket euz ar vro  
pa vezo malet deomp-ni, neuze ni ho c'hlaso.  
Setu kenta finesa en devoe ar c'hloarek :  
eren 'reont ho zac'hadou goude ma cent malet.  
o lakat warnezho lasou mad stardet c'houek  
neuze ez ejont kuit war-zu klask ho c'hezek.  
Setu kenta finesa en devoe ar miliner :  
eren ar zac'hadou gant eur zug kreff eun er  
ha darc'hei war n'ezho azloc'h eul liser wenn  
ne zea ken gant ar c'hloarek d'ar gear nemet ar brenn.  
- Selaou, va breur, 'me'r c'hloarek, n'oun petra meuz kleve  
me gred 'ma ar miliner o vazata he bried.  
Mont a reont da zellet dre eunn toull ica en nor.  
ne gredent gant ar vez zoken goulen digor.  
- Deomp dre 'nn tual, 'mezhan, ne lojimp ket er-maez :

pe gobred hor sac'hadou hor bo lod eus ar c'hrampoez.  
Sellit ouzomp, meliner, penaoz omp-ni gleviet  
bet omp pell o redek ha kollet hor c'hezek.  
ha tenval eo 'r gwasa, pell eo deomp mont d'ar gear  
fenez e rankimp loja enn ho ti, meliner.  
- Va joa, eme'r miliner. Bez'em euz tri gwele:  
va grek ha me en unan, va merc'h en egile.  
Setu eunn all nevez, ne vez den 'bed enghan.  
Emeur oc'h ober krampoez, hag ho po da goania.

\*\*\*\*\*  
Karantez ar bennherez a dlle enn nos-se  
dout d'he divertissa da gichen he gwele.  
ar c'hloarek her gouezaz, a ieaz da dal ann or.  
hag a skoaz goustadik hag en devoe digor.  
- Delit, 'me ar bennerez, gwisket eur roched fresk.  
P'ho po debred, evet, deut enn ho kwele prest.  
amourcoust ar bennerez pa deuz da dal ann or,  
kaer en devoe darc'hei ne deue den d'he digor  
Mont a reaz ac'hano ha droug enghan, me gred,  
o pedi mil malloz war galoun ar merc'hed.  
Ebad oa klevet ar c'hloareg o lavaret d'he vreur :  
- Me zo bet hed ann noz gant merc'h ar milineur  
am euz bet diganti eur roched lien moan,  
krampoezigou viaouet ha leaz kaoulet d'am c'hoan.  
eul louarn a bag eur iar ne laosk ket da reded  
eunn den en tal eur feunteun zo diod gouzany sec'hed.

vvvvvvvvv

( Hervez J. Ollivier eo diglok ar skrid-mañ e-keñver  
an hini a gaver e Dornskridoù Ledan )

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

42. PERSOUN LESKOAT HA JEANNE AR GALLIK

O vont d'ar foar d'ann Huelgoat  
me renkontraz persoun Leskoat  
a ginnig din eur voutaillad  
ha me reaz dezhan eur podad.  
ma oe adjuget ar marc'had :  
- Fanch Moizan, laz Jann ar Gallik  
m'es grai a gant skoet pinvidik  
- vit ann dra ze (me) ne rinn ket  
koumer din diou veach e ze bet,  
bara he zad am euz debret  
Persoun Leskoat a lavare  
da Jean ar Gallik eunn deiz a oe :  
- Jeannik ar Gallik, va c'hoar gaer garet  
digasit ho kwele d'am c'hamp  
pa vo eet ho pried d'ar marc'had,  
ni iel hon daou enn eur gwelead.  
- evit ann dra ze ne rinn ket  
respeti va fried a zo dleet.  
Persoun Leskoat a zo fachet  
o veza ne deuz out-han sentet  
Jannik ar Gallik a lavare  
na d'he fried paour eunn deiz a oe :  
- Va fried paour, mar am c'heret  
ouzin a dra vad e sentfed :  
kasit va breur belek euz ho ti  
pe ma ne rit me zortai.  
- Jannik ar Gallik, va fried oc'h,  
ne ra nemet farsal ouzoc'h.  
Tremenet atao diout-han  
c'houl vezo welloc'h anezhan.  
- Ne deo ked farsal eo a ra  
rak gourdrouz a ra va laza.  
Persoun Leskoat a lavare  
da Jeann ar Gallik eunn deiz a oe :  
- Janik 'r Gallik, me meuz klevet  
eo ho tad nouet, sakramantet,  
abaoue diziou tremenet  
- Janik Gallik a lavare  
na de fried paour enn dervez-se :  
- va fried paour, na nam c'hirit,

da welet va zad ganen deuit,  
a zo nouet, sakramantet  
abaoue diziou tremenet.  
- da welet va zad ned-in ket  
da charreat mein /glaz/ me rank monet.  
kasit ho mitez vihan ganec'h  
hi a rai kompagnenez dehoc'h.  
e bord ar c'hoad pa zint erruet  
ar vatez he deuz lavaret :  
- petra zo a nevez er c'hoad-mañ ?  
ne ra va goad nemet krena.  
Va mestrez paour, ouzin sentit  
hag ac'han d'ar gear (c'houi) distroit.  
- vit ac'han d'ar gear me ne rinn ket  
da welet va zad me renk monet  
E ti he zad pa oa erruet  
bonjour he devez lavaret,  
bonjour ha joa er maner-man.  
Va zadik paour, peleac'h eman ?  
Klevet em euz ez eo gwall glañ.  
geier, va mero'h, ac'h euz klevet,  
rak evit klan me ne doun ket bet.  
- Va merc'hik paour, ouzin sentit  
hag er gear da loja choumit.  
evit da loja ne choumin ket  
va fried ganen a ve nec'het.  
E bord ar c'hoad pint erruet  
Fanch Moizan o deuz gwelet.  
gant han eur vouc'hal daou bennek.  
da Jean ar Gallik en deuz lavaret :  
- Lavar da in manus pa giri  
emoud aze el leac'h ma varvi.  
- Fanch Moizan, n'am lazit ket  
ha me roio dehoc'h daou c'hant skoet.  
Digant persoun Leskoat n'ho po ket.  
ar vatez vihan pe deuz klevet  
e vije he mestrez lazet  
d'he briata a zo lammet.  
Fanch Moizan dezhi ro eur javedad  
evit ma teuje d'he c'huitaat.  
- va mitez vihan, kea da laret  
dar gear dam fried forsan<sup>o</sup> he vreur belek  
In manus tuas, Domine,  
Jezus, kommerit va ene  
hag hini va bugel ive.  
hag hen skei gant-hi diwar he ...<sup>o</sup>  
ken a welaz penn ann inosant  
hag hen o c'houlenn badisiant  
ha d'he vamm baour ar sakramant.

° Ollivier a  
lenn : forban.

° Ollivier a  
lenn: flank(?)  
Cf. Ernault,  
Glossaire, p.239

( Persoun Leskoat ha Jeanne ar Gallik )

-Persoun Leskoat, didost aman  
da vadezi ar bugel man.  
- Pa zoud koumanset 'peurlazi  
taol i aze el leac'h ma kiri.  
taol i aze enn eur poull glaou  
ha golo anezho gant deliaou  
Persoun Leskoat a lavare  
na da Fanch Moizan neuze :  
- Kea brema da redek ar vro  
pam vezo arc'hant me da baeo.  
- Da redek bro me ne dinn ket,  
da genta me rank beza paet.  
Enn eun ostaleri ez int eet :  
boutailad o devez goulennet  
N'oant ket koumanset da eva  
ma koumans ar c'hok da gana,  
oc'h ar ber eno o rosta.  
Ann hostiz en deuz lavaret  
eunn dra bennak zo erruet  
p'en deuz eur c'hok rostet kanet.  
N'oa ket ho banneou peurevet  
daou archer en ti zo erruet.  
ex persoun Leskoat (ez) int kroget.  
Fanch Moizan n'ho deuz lezet.  
Persoun Leskoat a oe mouget  
ha Fanch Moizan hevelep  
Setu peseurt vad o deuz bet.

vvvvv

43. AR PAOUR

Deskit gant eur zervicherez  
da ober vad d'ar paour aliez.  
hennez eo hent ar baradoz  
ha da vont d'ar c'hloar da repoz.  
houman a zicure he boued  
'dal ma wele paour keaz ebet  
rei a gare ann aluzen  
beza oa mad oc'h ar beorien.  
hor zalver a zeuz eun dervez  
d'he c'haout ha da gacut he mestrez,  
gwisket enn eur paour da c'houlen  
kaout lojeiz eun noz hepken.  
Ar mestr er gear ne zedo ket.  
Ar vestrez he deuz lavaret:  
- ama neuz nemet daou wele :  
unan d'am fried ha d'in-me  
hag evit va flac'h egile.  
Paour keaz m'ho lojfe 'galoun vad  
ma oufenn peleac'h ho lakaat.

.....  
Setu pa oe ar paour lojet  
gant ar c'houez vad 'oant ravisset.  
pebez enor oa d'ar plac'h-se  
kaout hor Zalver enn he gwele.  
da bell ann noz divezad braz  
ar mestr er gear a erruaz.  
ar plac'h enn eur farsal out han  
he deveuz lavaret dezhan :  
- deut oc'h, va mestr, dam digousket.  
Ni hon doa eur paour ama lojet  
hag o sonjal ne zeujac'h ket  
eo eat em gwele da gousket.  
- N'em eus netra, netra ebet,  
eme ar mestr, da lavaret,  
ma n hoc'h euz great kement se  
ho tiou abalamour da Zoue.  
Ar paour he gomzou pa glevaz  
primm euz he wele a zeuz  
da c'houlen oc'h ar mestr timad  
d'he drugarekaat.  
.....  
Setu ma her pedjont ho zri

da chom bepred da reposit  
 hag e lavar ne raje ket,  
 e teuje da dal ann oaled.  
 pa zedont ho daou azezet,  
 unan a bep tu d'an oalet,  
 ar mestr en devez goulennet  
 hag hen 'ouie kelou ebed.  
 - Ec, emezha, ar vosen a zeuio  
 hag ar geraouez a echuo.  
 Kaer o devez ar veleien  
 prezeg <sup>bepred</sup> ehan d'ar gristenien  
 ne reont van e nep kountre  
 evit klevet komzou Doue.  
 - hag hen a zo ar virione  
 ar pez a livirit aze ?  
 - Ker gwir ha ma zec ho matez  
 maro war he daoulin, den kez,  
 maro ho plac'h enn he gwele  
 endra edo o pidi Doue.  
 eat eo he ene da reposit  
 gant ann elez d'ar baradoz.  
 Ar mestr he gomzou pa glevaz  
 prim d'he gampr hen a iez  
 ha pa zec ac'hano distroet  
 n'oa den mui war dro he oalet  
 met e leac'h<sup>o</sup> ar paour eur grusifi ° W:plas  
 a lak anezhan da estoni.  
 mar krede mad - piou ne gredfe! -  
 en devoa komzet oc'h Doue.

vvvvvvvvvv

( Sell. ouzh H. Perennès en Annales de Bretagne, levrenn 46, 1939, p.284-288 : Ar paour. )

Dornskridoù Milin: Kanaouennoù

44. AR SEIS MANAC'H

Er gerik a Voutroulez war ann hent da vont da Roum  
 euz savet eur gouent nevez zo enn han menec'h o chom  
 zo savet eur gouent nevez zo enn han menec'h iacuank  
 ne baouezont noz na deiz da ziroll ar merc'hed koant.  
 eur vinorezik iacuank hag a ioa meurbed devoez  
 a iea da iliz sant Franses, aben dicu, teir gwech bemdez  
 ha dont unan euz ar venec'h na da lavaret d'ezhi :  
 - deut ganeomp-ni, minorezik, deut ganeomp-ni(me) d'hon ti.  
 eno welot ann taoligner, ar mysteriou exselant.

.....  
 P'oa bet seiz mis hanter eno n'en em gav ket tamm euz  
 hag ivez ar seiz manac'h meurbed en em gav diez  
 ha dont unan euz ar venec'h na da lavaret d'ezhi  
 - Aotrou Doue, minorezik, 'trou Doue, petra raimp-ni ?  
 Dont a rai eur vikel nevez, e peb leac'h vezo klasket  
 Siouaz dehoc'h hu 'ta, minorezik, c'houi ranko beza lazet.

..... ° (AR RE-MA a zo a re er werzenn)  
 P'edo ar re-ma<sup>o</sup> ann daou iacuank o tont gant-hi d'ann traou  
 edo ar re (gosa) o rei dezhi fasadou  
 - en han' Doue 'ta, tad Olier, enn han' Doue n'am skoit ket,  
 eur bugel zo etre va dicu gostez meurbed a zo souezet.  
 - Ni hon euz lazet teir femelen, krouadar gant pep hind  
 ha c'houi ivez Fransezak an drivac'hved a reont hi.  
 Ni zo kriz evel ann diaoul<sup>o</sup> ha ien evel ann ero'h °a-us:  
 ne reomp van evit gwelet gouela na map na merc'h. diamant

.....  
 eunn den iacuank euz ann arme a zeuaz da c'houlenn loja  
 -lit enn ho roud, den iacuank, ne vez lojet den ama.  
 Setu ann digentil iacuank o tistrei war he c'his  
 hag hen gwelet eur femelen<sup>o</sup> traouik ann iliz.  
 hag hen monet da loja)  
 anntronoz paz eaz ac'hano ez eaz d'eun ostaleuri  
 e lavaraz d'an ostiz : - roit d'in da zibri, da eva  
 me lavarao deoc'h eun torfed am eus gwelet enn noz-ma.  
 me meuz gwelet laza eur plac'h, kaera plac'h a ioa er bed  
 Kaera plac'h a ioa enn idol hag a oufed da welot.  
 ann hini zo o kana ann oferen eo dalc'her ar goulou  
 ann hini zo oc'h he zervicha a zo paotr ar c'hontellou.

vvvvvvvv

45. AR PAOUR KEAZ

Me ho ped, spered Doue, entant va spered  
ma rinn eur chanson nevez da rei d'ar Vretouned  
diwar benn eur skouer braz a zo bet c'hoarvezet  
ebarz e Breiz Izel e miz Du tremenet.  
Krena ra va c'haloun ha va goad em gwaziou,  
va daoulagad ne reont nemet skuil(1) a daolou.  
O tonet da gompren peger braz eo'n anken  
digan hoc'h-hu, gwerc'hez, nerz, sikour me c'houlenn.  
goude ma oa maro he dud gant ar c'hlerved  
eunn den iacuankik flamm zo en em zilezet,  
zo en em zilezet da bep tristi(di)gez,  
da gaout nacun ha riou ha pep seurt paourentez,  
hema loa eur paour keaz ne grede klask netra.  
Tud vad, dre garantez, a gase boned dezha.  
O veza ma oa iouank 'teue tud d'he skandalat  
dre'n abek ne zortie, ne zee da labourat.  
Gouzant a re dismegans gant gwir baclanded  
o lakat he fizians er werc'hez binniget.  
beza en doa he imach ha hini ar basion  
dirazho bemdez c'houlou e pede a vir galoun.  
eunn ozac'h euz ar c'hontre, o klevet en doa posn  
a iez d'he welet, a lavaraz d'ezhan :  
- deut dam zi da labourat. - ar paour keaz a lavar :  
- gouzout a ran, emezhan, labourat ann douar.  
ne meuz ket a zillad, nag ivez pal na mar.  
pevar skoet a vank din vit gallout kaout pep tra.  
me a iafe d'ho ti 'vit neuze ho faes.  
ann ozac'h, war he c'her, pevar skoet en deuz roet.  
ha lavaret d'ezhan : - va mignoun na vankit ket.  
Lavaret a reaz d'ezhan : - deuz dam zi da labourat,  
pas pezo pal ha mar ha prenet da zillad.  
monet a reaz d'he di ma ce eur pennad mad  
plijout a rea d'ezhan, mad oa da labourat.  
eun dervez, dreist ann holl, e cent holl souezet  
o sonjal er paour keaz, e pelec'h oa chumet.  
mazedot da welet ma ce kavet maro  
ebarz enn he grampik war eunn dournad kolo.  
Lianet e ce e gorf da veza sebelist  
sevel a reaz ar brud mazedot tud da welet.  
He-man a reaz ive drema oa euz ar c'hanton

drema oa euz ar c'hanton, o Doue, pebez eston !  
o font er meaz ann ti en devez lavaret:  
- Biken ne zai ann ene-se e baradoz Doue  
ken nen devezo paet ar pez a vank din-me.  
Ne deuz ket gwall bell c'hoaz emez dezhan roet  
da breña pal ha mar ha dillad pevar skoet.  
dre ar c'homzou spountuz (na) neuze a lavar  
ne ouzoun ket penaoz ne zigor ket ann douar  
o viret oc'h ann ene a ioa o vont d'ar joaiou  
a vije digemeret gant Jezuz enn envou.  
ar verc'hez gloriuz Vari dre ma oa dezhi fidel  
a aotreaz ann eur-man adarre d'he zervicher  
ma teuje war ann douar evit dont da labourat  
evit donet d'he di da baea he zlead.  
Maret a reaz d'e di, bez'e oe digemeret,  
goulen a reaz labour ma oe dezhan roet.  
Labourat a ree'r park koulez hag ann tri wella,  
ar pez a estons, heb dibri nag eva.  
pa veze poent ar pred, kaer a ioa he bidid  
evit monet gantho, gantho holl da zibri  
en em daole a-gostez eno war he c'hinou,  
en em daole d'ann douar vit gouzarn he boaniou.  
Dont a ra an uzuiller souezet da gaout acun,  
monet a ra raktal da laret d'ar persoun :  
- Duman euz eul labourer a ra kemend ha tri  
hag ar pez a vantr ann holl, heb eva na dibri.  
- Mad, eme ar persoun, grit evel kent bepred,  
bremaik a-ben eur pennad, me ielo da wet.  
Pa z eaz ebarz er park dre c'hras ann aotrou Doue  
oc'h anavezaz prim penaoz oa cunn ene.  
- Me das ped, ene paour, lavar din-ta me ped° °lenn:me'z  
ha neo ket hirio eiz dez meuz da gorf sebeliet? ped  
petra ac'heuz ezoum, petra glaskez ama,  
petra ac'heuz ezom evit da ziboania ?  
- Pevar skoet am oa bet digant mestr ann ti-ma :  
dre vadelez va Doue ez cunn deut d'ho faea.  
- E-leac'h pevar, eiz me roic mar bez red  
ma vici em paour, vit ma vici diboaniet.  
- Nem euz ket a c'halloud da vonet d'ann envou  
ken nam bezo klevet gant va eal ar c'helou.  
Ware'hoaz d'ar marc-man, m'her laro dehoc'h, aotrou.  
Mont a reaz ar persoun da gas d'ezhan 'nn arc'hant  
evit ma vije tennet euz a boan, a dourmant.  
Pa astennaz he zourn da gemeret an arc'hant  
e santaz eur boan vras ( ann uzuiller dizamant ).  
he vrasac'h betek he skoaz out-han a oe sounnet  
hag ann arc'hant d'ann douar euz he zourn zo kouezet.

vvvvvvvvvv

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

46. COMPLAINTE SUR LA MORT VIOLENTE DU P. GUILLAUME  
LECCOURT, GARDIEN DES CORDELIERS DU MONASTERE DE  
N.D. DE GRACES PRES GUINGAMP.

Kichen goengamp, en couent Graç  
a zo bet gret eur malheur braz

ar gardien zo bet lahet  
gant daou vanac'h milliguet,  
'r per Louis, ar per Frances  
a heurtas 'n or assambles.

mez ann or a oa premet mad.  
- piou a zo aze, 'me an Tad.  
- digoret, 'me ann daou vanac'h  
- henoan na digrin ket dac'h.

Ann daou vanac'h a lavare  
da c'hardien Gras a neuze :  
- Gardien Gras, digor dimp ni,  
ema'r laer er saoristery.

Allum e ar golo er lamp  
digor armel ar sacramant.  
Gardien Gras, vel ma clevez  
da bedi Doue n'em lekaz.

'n e goaze, 'n e oele savet  
d'bidid Doue en em laket :  
- Itron Vari, assistanc din,  
mi'm euz ornet arvat ho ty.

daieu gali acu(r) zo 'n ho ty  
pa arruis na oa hiry.  
eur c'hmstod hag eur groaz arc'hant  
d'ho seis aoter accoutramant.

a neuze da digori e et :  
ker goaz digor n'han devoa gret,  
quer goaz digor n'han devoa gret  
e vue zo dea coustet.

ha pa oe marv gardien graç  
cetu ar c'hleyer o son glas !

ar per Louis a lavare  
d'ar per Frances ac a neuze :

- Kemer alc'housou ann ilis  
ha ques fomuz da groec'h ar ving.  
ha mar a zo nicun o son  
plant eunn dag emm creiz e galon.

ar per Frances a lavare  
enn traon ar ving pa disquenne :  
- mi assur d'hac'h dre ma fe vat  
n'an deuz nicun o vranseillat.

nan deuz nicun o vranseillat  
met graç ar cœrc'hez hag e map.  
da Vountroulez hi a zo et  
peb habit neve o deuz bet.

Peb habit ru passamantet  
oz menec'h na dereont ket  
ann daou vanac'h a c'houlenne  
ouz ar passajer a neuze :

- tremenet an omp ar bord al  
car nimp ni na nomp quet tud fal.  
- Tud honest oc'h; m'ho tremeno.  
tostet d'ar vag ha mi oelo.

ha dal ma tostajont d'ar vag  
e hes ann dour en liou ar goad.  
- petore torfet o heus gret  
dour ar mor n'ho andurfe quet.

- Gardien Graç a zo lahet  
ac a zo dimp ni tamallet.  
war al lec'h a hint bet staguet  
hac hep dale hint bet crouguet.

Autro Doue pardon dimp-ni  
d'ar martyr, de vuntrerien gri !



